


YANN DANIELOU

SIN AN TEMPL



Troidigezh

gant

MAODEZ GLANNDOUR

IMBOURC'H 148-149

1982

YANN DANIELOU

SIN AN TEMPL

troidigezh

gant

MAODEZ GLANNDOUR

IMBOURC'H

1982

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Trizekvet bloavezh

31 Mae 1982

Niverenn 148-149

Rakskrid, gant Maodez Glanndourp.7
Sin an Templ, gant Yann Danielou. Troidigezh gant
Maodez Glanndourp.11
Kenskriverezh, gant Maodez Glanndourp.79

oooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooo

Koumanant-bloaz : 70 lur. KRP : 1534 25 N Roazhon,
Y. Ollivier. E miz Genver e krog arc'houmanantoù
ha reiñ a reont ar gwir da zegemer ar stagadennoù
da zibab ar re a garfed prenañ.
Priz an niverenn-mañ : 20 lur.
Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-
Burloud, 35 000 Roazhon.

=====

Niverenn-wask : 50 015

Talvezout a ra an niverenn-mañ, dezhi un danvez hag ur pajennadur arbennik, evit miz Ebrel ha miz Mae.

An niverenn da zont a von un niverenn ordinal. Donta ray er-maez e dibenn miz Mezheven.

Emeur o prientiñ ar stagadenn PORZH AN IFERN. Spi hon eus e c'hello bezañ embannet a-raok ehanou an hañv.

Goulenn a reomp start digant al lenne-
rion ha n'o dije ket graet c'hoazh kas
hep mank o adkoumanant kent miz Gouere,
maz eus tu.

XXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXX

SJN AN TEMPL

RAKSKRJD

An holl ac'hanoc'h o deus klevet keloù eus Yann DANJELLOU, bet ganet e Lokronan-Kernev, aet da Jezuisist, deuet da vezañ Kardinal, hag ouzhpenn-se, mar plij, eus Akademiezh Bro-C'hall. Teologour brudet en deus kelennet en 'Institut Katolik' Paris, ha lezet dimp un 23 bennak a levrioù, hep kontañ pennadoù e-leizh e kelc'hkelaouennoù a bep seurt.

Mar em eus dibabet treiñ e brezhoneg un oberenn bet savet gantañ eo evit meur a abeg. Da gentañ dre maz eo dimp-ni, Bretoned, kement a vez savet gant Bretoned pe Gelted : ha dre ma tlefe bezañ troet en hor yezh an oberoù a dalvoudegezh bet embreget gant tud eus hor gouenn. Dre ma c'hellomp soñjal ivez, daoust na vez ket gwir atao (ken distummet ma vez ar speredoù gant kelennadurezhioù eus an diavaez) e vefe tostoc'h d'hor meizelezh seurt labou-rioù.

Pleustret hon eus war an droidigezh-mañ evit abegoù all : evidon ne dalv ket ar boan sevel da gentañ-holl geriadurioù o tegas termennoù a deologiezh pe a brederouriezh, troioù-lavar teknikel, evel pa c'hellfent bezañ ijinet en diavaez eus ur studiadenn pe eus ul levr bennak. Ret eo d'ar brezhoneg ren un emgann speredel, en em stummañ diouzh menoziadurioù diaes hag uhel, war an dachenn.

N'eo ket e vefe SJN AN TEMPL gant Yann Danieloù ar pezh a anver ul levr diaes. Eeun eo kentoc'h. Ar soñj, peurliesañ, en em zispleg ennañ gant sklaerder. Perak em eus neuze kemeret SJN AN TEMPL da dreiñ anezhañ ? Unan eus labourioù kentañ Danieloù ez eo. Met Danieloù e-unan a selle anezhañ evel unan eus e studiadennoù gwellañ : lavarout a rae zoken n'en devoa graet a-hed e vuhez a deologour nemet displegañ hiroc'h ar pezh a oa dija amañ evel un eeunweladur klok.

Evidon-me, ar pezh a blij din el levr-mañ eo an hentenn implijet : sed un deologiezh a chom tost da hini Tadoù kentañ an Iliz, diazezet maz eo war ar Skritur ha war soñjoù o'n em respont an eil egile, dre ma ro un daolenn verr met leun-mat eus ar gelennadurezh kristen, ha kement-se war linenn an Iston evel ma ra ar Skritur hec'h-unan en ur veskañ menozioù hag embregerezh, arvesterezh ha buhez.

An esa-mañ a zo un tammig dioutañ e-unan e-touez al levrioù bet skrivet gant Danieloù, daoust mac'h adkaver tra pe dra eus ar menozioù displeget amañ, en oberennoù all evel Mister Silvidigezh ar Broadoù, pe Mister an Azvent. Sachet eo bet goude-se war-zu studiadennoù a gave dezhañ bezañ gouzidikoc'h, - da lavarout eo, bezañ muioc'h diouzh ar menozioù hag an enklaskoù a-vremañ, evel e levrioù en-dro d'ar Yuzev-kristeniezh, pe c'hoazh kudennoù al liturgiezh, hep kontañ re diwar-benn ar relijion en hon amva kulturel a hiziv.

An gelennadurezh displeget amañ e SJN AN TEMPL a zo hengounel a-walc'h. Ur wech an amzer, mar en em ziskouez temz-spered an oberour, feuls ha di-chek, gant frazennoù a c'houlennfe un tamm kempouez, n'eus nemet degemer d'ober ha tennañ gonid eus e studiadenn. Setu perak n'em eus ket klasket notennañ : d'al lenner da varn ha da vezañ poellek

a-walc'h evit degas un adreizhadur bennak. Daoust ma oa deuet war fin e vuhez da vezañ furoc'h ha siouloc'h, e oa bet Danieloù ur spered avanturus a-wechoù ; met goude ar Sened-Meur, dirak diboellegezh teologourion 'zo e oa troet adarre da vezañ klasekoc'h. Se a c'hoarvez gant meur a hini.

Evitañ da vezañ bet eus Akademiezh Bro-C'hall ne gav ket din e vefe Danieloù ur skrivagner ken ampart-se. Bepred pe dost eo an hevelep stumm a frazennoù, an hevelep gerioù. Ne vez ket bepred peursklaer ar soñj, hag e kaver gerioù na glotont ket gant ar menoz. Diaezamantoù evit an troer. N'em eus ket klasket treiñ ger evit ger : da gentañ, dre n'eus ket parelezh da vat etre ar galleg hag ar brezhoneg, ha d'an eil, dre ma fell din lakaat al lenner da gompren ur soñj ha n'eo ket da gaout ul luc'hskeudenn vrezhonek eus an oberenn. Mar fell da unan bennak soñjal e galleg eo kentoc'h dezhañ kemer diouzhtu al levrig gallek : frazennoù 'zo troet ger evit ger ne lavaront netra ken e brezhoneg, ken disheñvel maz eo ijin an diw yezh ; eno dres, e vez gwelet an disheñvelder.

Daoust hag em eus pardon da c'houlenn evit se digant Danieloù ?

M.G.

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

SIN AN TEMPL

Menez an Templ a zo gant hini an Emglev (ar Gevredelezh) unan eus pennsoñjoù an Testamant kozh, unan eus ar re a c'heller ganto dizoleiñ ster ar Skritur. An Templ a zo e-kreiz un hollad a velegiezh hag a liturgiezh, gant ar sakrifisoù, ar bedenn-lid, ar gouelioù.

Met n'eo ket hepken en Testamant kozh e talc'hfe ar menoz-se ul lec'h bras. En em ziskouez a ra kenkoulz all en Aviel. Jezuz e-unan a zo bet hoalet gantañ. Degasomp da soñj, penaos a-dal ar penn-kentañ e welomp Jezuz kinniget en Templ ; ha goude-se, Jezuz da zouzek vloaz o kelenn an Doktored e Templ Jeruzalem; hag e-pad e vuhez-prezeg Jezuz en Templ o'n em ziskouez d'an dud da genver ar Gouelioù bras, an Teltennoù, an Dedi, ar Pask.

Muioc'h a zo. Ul liamm kevrinus a zo etre Jezuz hag an Templ. War lein an Templ e voe douget gant Satan e deiz an Temptadur. Ar gomz, dreist ar re all, ma vo kondaonet eviti, a vo bezañ lavaret : "Distrujit an Templ-se (an Templ-mein, pe gentoc'h, Templ e gorf), ha me a adsavo anezhañ dindan tri devezh." Sed aze sin an Templ, a zo dasorc'h, da lavarout eo, mister bezañs Doue e natur-den Jezuz-Krist, hag en e dud, goude e vezañs e Templ Jeruzalem. Erfin, pa varv Jezuz war ar Groaz, gouel an Templ o regiñ dre an hanter a zo unan eus

SIN AN TEMPL

Menez an Templ a zo gant hini an Emglev (ar Gevredelezh) unan eus pennsoñjoù an Testamant kozh, unan eus ar re a c'heller ganto dizoleiñ ster ar Skritur. An Templ a zo e-kreiz un hollad a velegiezh hag a liturgiezh, gant ar sakrifisoù, ar bedenn-lid, ar gouelioù.

Met n'eo ket hepken en Testamant kozh e talc'hfe ar menoz-se ul lec'h bras. En em ziskouez a ra kenkoulz all en Aviel. Jezuz e-unan a zo bet hoalet gantañ. Degasomp da soñj, penaos a-dal ar penn-kentañ e welomp Jezuz kinniget en Templ ; ha goude-se, Jezuz da zouzek vloaz o kelenn an Doktored e Templ Jeruzalem; hag e-pad e vuhez-prezeg Jezuz en Templ o'n em ziskouez d'an dud da geñver ar Gouelioù bras, an Teltennoù, an Dedi, ar Pask.

Muioc'h a zo. Ul liamm kevrinus a zo etre Jezuz hag an Templ. War lein an Templ e voe douget gant Satan e deiz an Temptadur. Ar gomz, dreist ar re all, ma vo kondaonet eviti, a vo bezañ lavaret : "Distrujit an Templ-se (an Templ-mein, pe gentoc'h, Templ e gorf), ha me a adsavo anezhañ dindan tri devezh." Sed aze sin an Templ, a zo dasorc'h, da lavarout eo, mister bezañs Doue e natur-den Jezuz-Krist, hag en e dud, goude e vezañs e Templ Jeruzalem. Erfin, pa varv Jezuz war ar Groaz, goul an Templ o regiñ dre an hanter a zo unan eus

an tri sin a verk an urzhiadur nevez : setu disakret an Templ kentañ o vezañ m'eo bet diazezet an Templ nevez.

Sed amañ al linenn a vo heuliet gant hor prederiadur. Evit displegañ an temad-se eus an Templ e klaskimp dizoleiñ a-hed ar Skritur ar modoù disheñvel eus chomadur Doue e-touez an dud - peogwir eo se eo an Templ, - modoù uheloc'h-uhelañ. Bleniet e vimp evel-se eus menoz kentidik an Doue hegarat da venoz Doue kuzh ar Sinaï. Tremen a raimp eus chomadur an Tri ferson e natur-den ar C'hrist istorek d'o chomadur er C'horf kevrinus, Templ an Ar-boellerezh nevez, hag e pep unan eus izili ar ar c'horf-se. Diskouezet e vo dimp erfin gant bezañs ar C'hrist e Sakramant an Aoter, ar rakskeudenn brofedek hag ar sin en amzer an dud eus savidigezh an Templ eskatologel taolennet gant sant Yann en e Ziskuliadur.

Hag evel-se he devo ar Skritur displeget dimp unan eus he misterioù donañ.

.....

I

AN TEMPL-SE
HAG A ZO AR BED

Da gentañ-holl en em gavomp dirak ar menoz ha n'eo ket kristen drezañ e-unan, daoust maz eo koulskoude tra eus gwirionezioù istorek ar Gristeniezh, menoz hag a vez ken aes ha tra displeberet en diavaez dezhi ; da lavarout eo, kement-mañ : Mister an Templ a zo da gentañ mister ar Grouadelezh hec'h-unan.

Gant se e fell din anataat en deus ar bed ur sujidigezh a orin e-keñver un Doue personel ha dreistnaturel, met ivez lavarout en deus pep tra bremañ bepred un hevelep sujidigezh en e geñver ; hag en abeg da se ez eus ur vezañs eus Doue hag a ro d'ar C'hosmos a-bezh un dalvoudegezh sakrel.

Sakr eo ar Grouadelezh a-bezh pa zeu er-maez er penn-kentañ eus daouarn Doue; Baradoz an Douar eo an natur e stad ar c'hras. Ar C'hosmos a-bezh a zo Ti Doue ; an neñv eo e deltenn, e dabernakl ; an douar, skabell e dreid. Ul liturgiezh vedel a zo, hini an eien, ar bleunioù, an evned.

Amzer an Uheldadoù a vir c'hoazh un dra bennak eus ar c'hras baradozel-se. Emañ C'hoazh Spered Doue o plavañ war an dourioù. Yahve ne vez ket skeudennet evel un Doue kuzh dispartiet diouzh ar bed ; emañ o komz

diardoù gant Noac'h (Noe). E zarempredoù gant Abraham a zo re ur mignon : "Yahve en em ziskouezas dezhañ e Dervennoù Mambre, evel ma oa en e goarez ouzh antre e deltenn e-pad tommder an deiz. Sevel a reas e zaoulagad da sellout. Ha setu ma oa tri den en o sav dirazañ. A-dal m'o gwelas e redas a-zirak e deltenn etrezek enno, hag o vezañ stouet d'an douar e lavaras : Aotrou ! Mar em eus kavet gras dirak da zaoulagad, na dremen ket, me az ped, pell eus da servijer. Teurvezit e vefe degaset dour evit gwelc'hiñ ho treid." (Gen. 18, 1-5). Abraham en deus eta e-keñver Doue ar frankiz-se a gomzoù hag a veze merket en Hellas en amzer gozh, evel perzh ar c'heodedad en e frankiz, hag an dra-se eo a zo komprenet gant sant Paol evel frankiz bugale Doue e-keñver o Zad. Evit Abraham eo c'hoazh an natur a-bezh un Templ : ur guchennad gwez, ur vammenn-dour a zo evitañ darn eus ar Baradoz - lec'h ma kinnig e sakrifisoù; ur maen gouez a zo evitañ un aoter.

Sed aze ar relijion gentañ, kumun d'an de-nelezh a-bezh, a gaver ar roudoù anezhi distummet, saotret, nammet, en holl relijionoù. Evel-se ar relijion hellenat, ar c'hoad sakr, an alsos gant e andon. Met deuet eo al liesdouea-degezh da wastañ ar jestr kentañ. "E-kerzh ar remziadoù tremenet, Doue en deus lezet d'an holl vroadoù da vont gant o hentoù o-unan, daoust n'en deus ket manket da reiñ testeni diwar e benn e-unan gant ar vad en deus graet o pourveziñ deoc'h eus an neñv glaveier ha koulzioù-amzer frouezhus, o pourchas d'ho kalonoù o gwalc'h a vagadurezh hag a leve-nez." (Ober. 14, 16-17).

Ar furion hepken eo ar re a zalc'he da

glask sinoù e Templ an Neñv, en ur sellout aketus ouzh ar stered evit spisaat pelec'h sevel kêrioù hag aoterioù. Ar vesaerion hag ar Vajed en Aviel a zo evel un testeni eus ar menoziadur kentañ-se, chomet kuzh dre zindan hag o tont en-dro war varr pa ne oa ket bet breinet a-grenn gant ar pec'hed na diverket gant an diskuliadur graet da Voizez.

Derc'hel a ra kement-se da vezañ evidomp ar 'sakrel' en e zoare kentañ, gant an dam-gwel eus bezañs Doue e sioulder an noz, e teñvalded ar forestoù, e diventelezh ar gouelec'h, e luc'hedenn ar meiz, e glanded ar garantez. Sed ar pezh a verze al labourer-douar boer, a gomz Otto diwar e benn, hag a grede klevout e digenvez ar gouelec'h gant an heol o skeiñ e vannoù war ar gomepenn, ur vouezh o komz outañ. Sed ar pezh a laka da gompren an doujañs relijius a dleomp da draoù an douar. Met an doare sakrel-se n'en deus ur wirionez bennak nemet pa gompren anezhañ evel stag ouzh ur vezañs personel : "An doujañs," eme bPéguy, "en em astenn evit gwir d'an hollved e kement a zo anezhañ. Ankouaat a reer re ez eo an hollved, krouadelezh. Hag an doujañs, evel ar garantez, a zo dleet da bep krouadur." Bezañs personel, Doue kuzhet ha war un dro diskuliet gant ar sinoù, eñ eo a laka da sevel ennomp an doujañs relijiel.

En Templ-se n'emañ ket an den evel kentañ, evel er gêr, - e Ti Doue emañ. Ha gant se e oar penaos e tle kaout resped ouzh ar c'hrouadurioù pa ned int ket dezhañ, penaos ne c'hell stekiñ ouzh netra hep aotre : sakr eo pep tra, ar gwez zoken a zo karget a gevrin. Hag ar sakrifisoù kentañ a zo hepmuiken anza-vadur uheldomani Doue : Eñ, Doue, en em

servij da gentañ gant ar preveudi, ar frouezhioù kentañ, hag e ro d'an den an aotre da gemer ar peurrest. Hogen war un dro, ez eo an den ul lod eus ar grouadelezh e-lec'h m'en deus e labour da seveniñ. Doue en deus lezet, en ur stumm bennak, ar grouadelezh diechu, ha karg an den eo kas anezhi d'hec'h echuadur ; gant al labour e tenn gonid eus ar pourvezioù kuzhet en natur, ha neuze eo sakr al labour, o vezañ maz eo kenlabour an den da sevenidigezh doueel ar Grouadelezh ; evel dre an anaoudegezh hag an arz emañ an den oc'h uhelaat an natur a-us d'he dibadelezh, evit he lakaat da dremen en hollbadelezh hag e dreistelezh ar speredel.

Erfin, dre implij an danvez er Sakramantoù, e vez roet d'an traoù gwelus an enor uhelañ, n'eo ket hepken aroueziañ ha sinadekaata(1)met oberiañ en un doare efedus en eneoù ar c'hras doueel : evel-se, gant an dour eo ar buridigezh a vez graet ; gant an eoul, nerzh ha diboan a vez roet. An den eo an hanterour ma vez kenstrollet ha profet gentañ da Zoue an hollved gwelus ; eñ a zo beleg ar grouadelezh werc'h-se ma stou Doue etrezek enni gant karantez. Drezañ e teu lidadurezh vut an traoù da vezañ un akt a adoridigezh emskiantek :

"An natur a-bezh hepdon a zo didalvoud ; me eo an hini a ro dezhi ur ster ; ennon e teu an traoù da vezañ

Peurbadel dre ar menoz am eus anezho ; me eo an hini a ginnig ar Grouadelezh evel sakr." (Paul Claudel : Cinq grandes Odes. 1913. Pe-vare mouladur. P. 174.)

Evel-se emañ an natur a-bezh, eme sant Paol, o c'hortoz digant an den ma vo kaset

d'he finvez. Doare sakr ar garantez da skouer ne ziwan ket eus bezañs teñval ar vuhez, eus bountadur ar ouenn oc'h implijout an hiniennoù evit tizhout he fal hec'h-unan, met eus bezañs Doue o lakaat an den dre ar garantez da gaout perzh en e labour e-unan : "Pa vezen en e gichen em boa bepred pe dost ar santadur eus bezañs aktuel Doue," a skrive Alis Ollé-Laprune diwar-benn he fried.

Honnezh eo glanded ar Grouadelezh. Santel eo ar c'hrouadurioù, ha gortoz a reont ma vint kaset gant an den betek e finvez. Met an urzhiadur-se en deus an den ar galloud d'e wastañ. Mar c'hoarvez gentañ en em zistreiñ diouzh Doue, en em zisakrañ dre chom hep bezañ ur c'hrouadur reizh, e tisakr war un dro ar bed e-unan dre rediañ anezhañ d'un implij saotret. An dizoloadennoù hag an ijina-durioù danvezel a dlefe skoazellañ an den d'en em frankisaat e-keñver an danvez ha da seveniñ startoc'h kumuniezh etre an dud, - met treiñ a reomp anezho da vezañ binvioù hor c'hasonioù ; kened ar c'horfoù hag a zo adsked hoalus eus kaerder an eneoù, o 'gloar' gwelus, hag a dlefe enaouiñ ennomp karantez ha doujañs, setu ma reomp anezhi ur vammenn a blijadur emgar ; madoù ar c'hultur hag a zo karget da skoazellañ hor spered-den da uhelaat ha da ledanaat, setu ma reomp anezho binvioù hon distummadurioù a ispisialourion, a genedourion, a skiantourion...

Ar grouadelezh, hi avat, a zo didamall e-keñver ar fazioù-se, p'emañ ganto'o c'houzañv drouknerzh'. Argarzhus eo dezhi, pur ha santel, bezañ saotret evel-se gant implijadurioù disakr. Hag an doare eviti da ziskleriañ hec'h argarzh eo an eneberezh a ziskouez pa zistro-

omp anezhi diouzh he finvez. Etrezomp hag hi ez eus ur stourm anat a zo heuliadur ar pec'hed.

"N'anavezit netra e braster an hollved
Ha na c'hellfe bezañ ur benveg a wallreuz ..."

(Ch. Péguy, EVE. Gallimard, 1941. P.740.)

Sed aze ar bed enebour a anavezomp, Tec'h maz eo pep tra gwallriskl ha gourdrouz. Ha seul gizidikoc'h maz omp, seul wiroc'h e teu kement-se da vezañ evidomp. N'eus den ebet en divije santet muioc'h eget Rilke: "Ar spouronus a zoaze e pep elfenn eus an aer ; en sachañ a rez ennout gant da alan, ha goude ma vefe diwelus..." An dispac'h-se eus ar c'hrouadurioù, sed aze mammenn hor poanioù, an danvez oc'h enebiñ ouzhimp. Er baradoz kentañ ne oa ket eus an dra-se, ha ne vo ken anezhañ er Baradoz adkavet, rak Jezuz eo an hini a zegas dija ar Baradoz en-dro, p'emañ o vestroniañ war ar mor hag an avelioù, o pareañ ar re glañv.

Bez' ez eus enta un deñvalded, un divoullded eus ar bed, gant hemañ o chom pell diouzh diskuliañ Doue dimp, met er c'hontrol o kuzhat anezhañ dimp hag ouzh hon pegañ ouzh an douarel. Dont a reomp gant se da vezañ sklavourion, pa'z omp bet galvet da vezañ rouaned. Ha petra eo tan an Ifern, nemet an dispac'h-se eus ar Grouadelezh o tont da vezañ divrall da viken ?

Penaos adkavout ar gensoniezh kollet, penaos en em adunvaniñ gant an traoù? Sed an hiraezh a ro marteze d'ar varzhoniezh he donder, pa'z eo ur strivadenn evit adc'honit perzhioù dibar ar Baradoz kollet ha klodusidigezh ar c'horf, hep tremen dre an emzistro a galon. Hogen stag eo pep tra ouzh an emzistro a galon. An traoù

int-i n'o deus ket kemmet. Chomet int ar pezh e oant. Hon gortoz a reont, dinamm ha karan-tezus. Ennomp avat emañ an dizurzh. Mar fell dimp adkavout joa ar Baradoz hag ar vignoniezh gant traoù ar bed, eo ret dimp degas anezho en-dro da vezañ ar pezh ez int, o ren-tañ dezho o c'harg a servijerion eus ar reizher. Paouez a raint a deurel ouzhimp o rebech mut ; adkregiñ a raint da ganañ en-dro dimp: "N'eus nemet un ene puraet a c'hell kompren c'hwez-vat ar rozenn," eme gClaudel. Ret eo din adkavout glanded ar sell. Neuze e teuo ar c'hrouadurioù da vezañ adarre kemennerion a sklerijenn.

An adunvanidigezh-se, paradozel, eo an hini a welomp en-dro e sant Frañsez a Asizi, e sant Yann ar Groaz : "Ya, din-me eo an neñvoù ; din-me eo an douar ; din-me eo ar pobloù... Petra 'ta a fell dit, petra a glaskez, va ene ... ? " Ne chom netra ken enno eus ar mantr dirak ar galloudoù kosmek, pe ar galloudoù istorek, dirak an holl reuzioù-se a-ispilh a-us da vuhez an den. Ar spont dirak an natur a zo trec'het ; addeuet eo an hollved da vezañ an Templ m'emañ ennañ an Doue tost ha nes o vale diouzh an noz, hag an den o vont aketus, distroñs hag emsoñjus, d'e labourioù, evel d'ul liturgiezh dizehan, evezhiek ouzh ar vezañs-se a leugn e ene a zoujañs hag a deneridigezh.

oooooooooooooooooooooooooooo

II

TEMPL MOIZEZ

Sevel an Tabernakl, hag a vo diwezhatoc'h an Templ un eilstumm anezhañ, a zo bet ar garg bennañ fiziet e Moizez gant Doue. Stag outañ eo an Templ, evel an Emglev (ar Gevredelzh) ouzh Abraham : kefridi danevellet dimp e levr an Ermaeziadeg, sevel ur santual a vo hiviziken ti ispisial Yahve. D'ar santual-se e vo tri glozadur : ul leur da gentañ, - an Templ digor d'an holl;ha goude-se un deltenn, an tabernakl da gomz resis ; hag erfin, e diabarzh an deltenn, ar Santual dispartiet gant ur ouel, lec'h m'en em gav an Arc'h, Sez an Drugarez ('an trugarezer')hag ar Geroubed: eno emañ Doue o chom.

Disheñvel e vo evit gwir kenetrezo ar savadurioù a gemero korf an eil war-lerc'h egile, diwar an uhelskouer diskouezet da Voizez war ar Sinai.Da gentañ e vo ur santual mont-dont, a vo treuzdouget gant an Hebreed dre ar gouelec'h,- anezhañ un deltenn-lien toet gant lèr. Pell emamp gant se diouzh Templ Herodez bet anavezet gant Jezuz, hag a oa ur savadur tonius-kenañ. Etre an daou dra-se e oa bet savet ar Santuale Silo,hag eno dilezet a-walc'h betek ma tegasas David gant lid an Arc'h e Jeruzalem, ha ma lezas d'e vab Salomon ur

raktres eus an Templ a zlee dont gantañ da wir. An Templ-se bet distrujet gant Naboukadenar a voe adkempennet well-wazh gant Nehemia ha gant ar Yuzevion distro eus an Harlu. Eñ eo an hini a dlee bezañ adreset ha kaeraet gant Herodez.

Met ne vern ket an doareoù diavaez-se. Ar fed relijiel o kontañ amañ eo bezañs Doue en Templ adalek Moizez betek maro Jezuz : rak distrujidgezh an Templ e 70 ne vo nemet ar sin diavaez eus fin e dalvoudegezh evel sakr. An Templ a zo ar chomadur, ar Shekinah lec'h m'emañ o chom gloar Yaveh : "Ar goabrenn a c'holoas telenn an Emgav, ha gloar Yahve a leunias ar chomadur. Ha ne c'helle ken Moizez antren e telenn an Emgav o vezañ ma chome warni ar goabrenn ha ma oa leuniet ar chomadur gant gloar Yaveh." (Erm. 40, 34-35)

Eno emañ Doue o komz gant e gannaded. Evel-se da Yec'hezekel : "Ar Spered am dibradas hag am lakas e-barzh al leur diabarzh ; ha setu ma voe leun an ti gant gloar Yaveh. Ha klevout a ris ur vouezh a gomze ouzhin eus diabarzh an Ti." (Yec'h. 44, 15).

Eno eo bepred, war dreuzoù an Testamant nevez, e vo graet da Zakaria, tad Yann Badezour, kemenn eus ganedigezh e vab : "Un Ael eus an Aotrou en em ziskouezas dezhañ, en e sav, e tu dehoù Aoter an Ezañs." Eno emañ kreizenn buhez relijiel Israël : er gouelec'h e oa an Tabernakl kreiz kampadur ar gantree-rion ; en amzer an Distro eus an Harlu eo e-barzh an Templ adkempennet m'en em stumm restad bihan ar re saveteet da vezañ ur gwir gumuniezh a leaned ; hag ar re dastrewet a zeu di, da Jeruzalem, eus a bep tu, evit eno azeuliñ Doue.

Ar garantez-se e-keñver an Templ eo er Salmoù e kavomp an heklever anezhi. Hizio, gant gwir abeg e kanomp diwar-benn an Iliz o gwerzadoù, rak hi eo an hini a veze merket gant sellad ar Brofediezh, evel dleet dezhi dont da wir diwezhatoc'h ; met lavaret int bet da gantañ diwar-benn an Templ : "Aotrou, karet em eus kened ho ti, al lec'h a zo chomadur ho kloar... Na pegen kaer ho teltennoù, Aotrou ar Galloudoù. Va ene a langis dinerzh gant ar c'hoant eus leurioù Yahve... Un deiz hepken en ho porzhioù a zo gwelloc'h eget miliadoù e lec'h all... Ne c'houlenn va ene nemet un dra : bezañ o chom e Ti Yaveh a-hed deizioù va buhez."

Peseurt diforc'h a zo etre Templ Moizez hag hini an hollved ? Peseurt pennad-hent a zo merket gant diskuliadur ar Sinai e mister bezañs Doue? Gant an taol-sell kentañ e seblantfe e vefe ur giladenn. Betek-henn e oa bet tu da ginnig da Zoue sakrifisoù n'eus forzh pelec'h. Hiviziken ne blijo mui da Zoue nemet ar re a vo profet en Tabernakl ; n'eus ken nemet ur santual : "Distrujañ a refot an holl lec'hioù sakr ma servije enno o doueoù an holl vroadoù emao'h o vont da ziberc'hennañ, war ar me-nezioù ha war an torgennoù, evel dindan pep gwezenn c'hlas." (Adl. 12, 2). Ken kalet e vo kavet al lezenn-se ma ranko ar veleion e-pad kantvedoù stourm ouzh an Hebreed evit mirout na savfent aoterioù, zoken pa ne veze ket evit azeuliñ idoloù. N'eus ken bremañ nemet ul lec'h hepmuiken evit al lidoù. Evit gwir, e mennad Doue ez eus aze un heñchadur peurret ; ar riskl bras a oa al liesdoueadegezh ; unander ar santual a oa ar sin eus unander Doue. Sed ar pezh en devoa komprenet mat an isto-

rour Yozef : "N'eus nemet un templ evit an Doue unan." (Ant. Jud. III, 6). En abeg da se eo chomet ar Yuzevelezh un undoueadegezh, hi nemeti en Henamzer.

An eil tres hag a seblant merkañ ha diforc'hañ relijion ar Sinai eo an islonk kleuziet ganti etre Doue hag an den. Amzer evurus, a vije lavaret, pa zeue Yaveh da gomz diardoù gant an Uheldadoù. Hiviziken emañ o chom e sekred Santual ar Santualioù, diwallet gant tri a glozadurioù : an hini kentañ, n'eus nemet ar Yuzevion a c'hell tremen en tu-hont dezhañ, ha c'hoazh goude bezañ en em buraet ; an eil a zo miret d'ar veleion ; evit an trede eo ar beleg-meur hepken, ur wech ar bloaz, a c'hell mont e-barzh Santual ar Santualioù, leun e galon a zoujañs hag a spouron. Arabat da zen disakr ebet krediñ tremen en tu all d'an treuzoù difennet ; evel Heliodoros a vefe skourjezet gant an Aeled. Gwechall eo an natur a-bezh a oa ti Doue, leun ma oa gant e vezañs sakr. Bremañ ez eus un disparti etre ar sakr hag ar boutin, ar pezh a zo e-maez an Templ, ar foran. "Ar veleion a zesko d'am fobl ober an diforc'h etre ar pezh a zo santel ha disakr." (Yec'h. 44, 15).

Kement-se a c'hell lezel ganimp un tamm keuz eus an Eden kentañ. Ha koulskoude, diskuliadur ar Sinai a zo ur gammed war-raok. En ur zispartiañ evel-se an den diouzh Doue, ec'h anata daou dra. Da gentañ, diskouez a ra sklaeroc'h braster ha santelezh Doue : Eñ a zo evit gwir an hini peurdiseñvel. Gouzout a reer re vat penaos ar C'hresianed, gant o doug da dostaat o doueoù ouzh an den, o deus disteraet ha vilaet anezho. Er c'hontrol, Doue Israël a zo an Doue dreistel, kuzhet e teñvalijenn an

Tabernakl karget da skeudenniñ mister e anien - e ziveizusted. Aze ez eus ur gammed vras graet war-raok en anaoudegezh Doue : "An anaoudegezh wirion hag ez a Moizez war-zu enni, eo kompren emañ an hini a glasker a-us hag en tu-hont da bep anaoudegezh, hag e chom dispartiet a bep tu gant e ziveizusted evel gant un deñvalijenn. Setu perak Yann ar C'hev-rinour hag a zo aet e-barzh an deñvalijenn sklerijennus-se, a lavar n'eus bet den morse evit gwelout Doue ; hag an nac'hadenn-se a zo diskleriañ emañ anaoudegezh anien Doue, n'eo ket hepken a-us da spered an den, met a-us da bep natur speredel." (Gregorios Nisa : Buhez Moizez.)

An disparti-se etre Doue hag an den a anata c'hoazh un eil gwirionez : pec'hed an den. Lakaat a ra an den da santout an diburentez don-se a vez anvet ar pec'hed a orin ; evel m'en deus sant Paol en diskouezet splann, al Lezenn, hi ha ne salv ket met a gondaon kentoc'h, a vir ouzh an den da grediñ e vefe awalc'h drezañ e-unan evit tizhout ar santelezh ; e zegas a ra da gaout un emskiant sklaeroc'h eus e zienez a natur, ha da heul kement-se, evel ma lavar Pascal, e tro anezhañ da "astenn e zivrec'h d'e zieuber." Evit tremen eus diouiziegezh ar bugel d'ar santelezh wirion n'eus hent berr ebet ; ret eo tremen dre izelegezh ar pec'her. An hent o vont eus Eden da Zouar ar Bromesa a dremen diouzh ret dre ar Sinai, - da lavarout eo, dre hent an izelegezh hag ar buridigezh.

Talomp pled koulskoude penaos Templ Moizez, evitañ da vezañ ur c'hammedad war-raok e-keñver Templ an hollved, ne ziverk ket hemañ. Templ an hollved a zalc'h da dalvezout.

Perzh dibar an holl ekonomiezhoù-se o tont an eil war-lerc'h eben, a zo evit pep unan mont pelloc'h eget an hini diagent, ha war un dro mirout anezhi. Evel-se, Jezuz, d'e dro, a lavaro : "N'on ket deuet da zistrujañ |Templ Moizez| met d'e gas d'e leunder."

Gant se, Templ Moizez a vir e-keñver Templ an hollved un dalvoudegezh arouezel anat. Rak Templ an hollved e oa ennañ tri gelc'hiad : an neñv, an douar, ar mor. Hag ivez, Templ Moizez a zo ar sin anezho : Santual ar Santualioù, chomadur Yahve, a zo skeudenn an Neñv, lec'h m'en em guzh Doue en deñvalded ; an Tabernakl a zo arouez an douar gant simboloù al lidoù : aoter ar c'hwez-vat o vezañ un astenn da ezañs ar bleunioù, - taol baraennoù ar c'hinnig o tegas soñj eus profadur ar frouezhioù kentañ, - ar c'hantolor o teviñ eoul hep ehan ; hag erfin, evit skeudenniñ ar mor e oa an atrium, ar porzh kentañ, gant ar Mor Arem, a servije evit an olokostoù. Evel-se, gant an Templ eo an hollved, ar Makrokosmos, a zo aroueziet, an Templ o vezañ evel ur bihanved, ur Mikrokosmos o sinadekaad egile. Diwezhatoc'h e kavo bod en ilizoù-meur, an holl loened hag an holl vleunioù skultet war tokoù ar pileroù.

oooooooooooooooooooooooooooo

III

AN TEMPL
HAG A ZO AR C'HRIST

Ne oa Templ Moizez nemet un dra da c'hortoz. Un urzhiadur nevez a zeu war e lerc'h gant ar C'hrist ; eñ eo ar gwirvoud ha ne oa an Templ nemet ur skeudenn anezhañ. Hiviziken, chomadur Yahve, ar Shekinah, ne vo mui Templ al Lezenn, met natur-den Jezuz : "Amañ ez eus muioc'h eget an Templ..." (Mazhe, 12,6). An Templ a c'hello hep dale steuziañ kuit ; e ouel a c'hello bezañ roget goude ar c'hConsummatum est ("Peurechu eo!") Ya, echu eo gantañ talvezout un dra bennak ; rak dirasket eo bet ar bed relijiel ma oa an Templ ar sin diavaez anezhañ. Gloar Doue, an Doxa, he deus dilezet an Templ. Ar C'hloar-se o testeniañ bezañs Doue a oa ar sked a veze gwelet en-dro d'an Tabernakl ; met ar sked-se ne oa nemet un adsked eus al lugern speredel-se a zo bed an Aelez en-dro d'an Tri Ferson, oc'h ober en-dro dezho evel un ec'honder sakr. Ar bed-se eus an Aelez a oa skeudennet en Templ kosmek gant Armeoù an neñv, ar stered, hag e Templ Moizez gant ar Geroubed (ar 'Gerubined'). Kefridi ar re-mañ a oa kuzhat ouzh an daoulagad disakr splannder Doue ; evel-se, gant Se-

rafined Izaia : "Serafined en em zalc'he dirazañ ; c'hwec'h askell a oa da bep unan; gant diw e c'holoent o dremm ; gant diw all e c'holoent o zreid,ha gant diw en em c'holoent. Krial a raent an eil d'egile : Santel; santel, santel eo Aotroù an Armeoù ; an neñvoù hag an douar a zo leun gant e c'hloar." (Iz.6,1-6)

Betek darvoud an Enkorfidigezh eo en Templ Jeruzalem e oa Gloar Doue o chom. Met en deiz-se e krog da vezañ e Jezuz. Arger e-unan a dalv en aviel sant Yann da lavarout an enkorfidigezh : "Ha deuet eo da chom en hon touez," pe gentoc'h : "Savet en deus e deltenn en hon touez," eo ar ger a dalv da verkañ annezadur Doue en Templ. Galloud Doue o c'holeiñ ar Werc'hez gant e skeud eo an hevelep tra hag ar goabrenn o testenianñ gant be bezañs e oa Yahve o chom en Tabernakl. Ouzhpenn un annezadur hag ur c'hloar gwelus,setu ivez ma vo ur c'hloar diwelus en-dro da natur-den an hini m'emañ an doueelezh o chom ennañ enkorfel. Gant Gabriel, setu m'en em ziskouez an Aelez vras; hiviziken e vezint en-dro da natur-den Jezuz, adrek dezhañ, met bezant bepred ; ne vo ket dreist-holl evit kanañ met da gentañ evit bezañ drezo o-unan, en-dro d'ar bugel koñsevet dija e korf ar Werc'hez, ar c'hloar-se eus lein an neñvoù a zo enkelc'hiadur an Doueelezh. Mister an Den-Doue en izelegezh ar c'hig, setu hag a zo bremañ danvez eus adorigezh an Aelez ; e-kichen an diavaezioù gwelus,eus un tu neñvel, diwelus, ment dreist-bedel an Enkorfidigezh.

Hiviziken e kavimp bepred Jezuz evel e-kreiz daou ved disheñvel. Eus un tu, o vont-dont gant ar Verb, ez eus ambrougadeg an Aelez hag a zo un adsked anezhañ, ar Speredoù

evurus evel bannoù a sklerijenn en-dro dezhañ -hag eus an tu all dienez ar c'hraou. An enebadur-se a adkavimp e tremenvan ar Salver, pa'z eus aze gantañ daouzek legion a Aelez d'ar c'houlz end-eeun ma resev pok Judas ha ma krog Malc'hos ennañ. Dibourc'hadur brasañ war dachenn an danvez, ha war un dro lugern brasañ o tont eus an neñv : eus un tu, dienez Betlehem, anken Liorzh an Olivez, hag eus un un tu all, korioù ar Gloria in Excelsis, Aelez brezelourion sant Mikael."Salver an holl vedoù, Roue an Aelez, eo an hini a roe ar Werc'hez he laezh dezhañ." Ar poz-mañ kaer-meurbet eus ur respont e Vijeles an Epifaniezh a lak anat dirak hon daoulagad an enebadur-se : ar Werc'hez izelek a ro laezh d'he bugel; ha war un dro, war-dreñv, emañ an Aelez, an holl vedoù - an neñv dreist-muzul. Sked ar Werc'hez gant he bugel en em goll er steredi, Mari kurunet gant stered a vag gant he laezh eus an neñv Salver ar c'hantvedoù. Sed aze ar Werc'hez a lavarar diwar he fenn : "Ab initio et ante saecula creata sum" : "A-dal ar penn-kentañ, a-raok an holl vedoù, ez on bet krouet." Sed an hini en em ziskouez a-drek da Vari eus Nazared. Gwir eo diwar he fenn, evel diwar-benn Mab an Den, an den eus an neñv, ez eus ur rakvezañs anezho e soñj Doue. Hi 'zo aze dija el Liorzh gentañ : "Mulier terebit pede." - "Ar vaouez az flastro gant he zroad," evel m'emañ aze er mintin kentañ : "Necdum fontes aquarum eruperant." - "N'o devoa ket c'hoazh tarzhet eien an dourioù," evel ul lod eus ar mister kuzhet en Doue a-raok ar c'hantvedoù.

Setu perak e kaver an Aelez vras en holl visterioù buhez Jezuz. Emañ Gabriel o ren mister ar C'heloù mat, evel m'emañ o ren an holl

gemennadurioù, an hini da Vari, da Zakaria, da Yozef, d'ar vesaerion ; emañ aze gant an holl heuliadeg a speredoù ez eo ar pennrener anezho. Rfaël a c'houarn an oberiadurioù doueel, ar burzhudoù, ar pareañsoù ; eñ eo an hini a zo Ael Bethesda o reiñ fiñv d'an douerioù pareüs, hag ivez ar frealzer, ar skoazel-ler ; e Aelez eo ar re a servij Jezuz e Gouelec'h an Temptadur hag a gonfort anezhañ en e dremen van. Mikaël, erfin, eo an hini a zo gant e legionoù e diadrenv ar Basion, leun e galon eus kounnaroù an Neñv, lugernadur trellus o herzel ouzh an argaderion hag a skoio d'an traoñ diwezhatoc'h, Saül-Paolos. Ar c'hloar-se, mar d-eo da gentañ, skinenn an heol peurbadel, komz ar sioulder, a zo ivez an Aelez o-unan, evel adskedoù eus sklerijenn ar Verb ha kendoniadurioù ar Gomz. Teurel a reont spouron sakr e kalon ar re a dosta enep-reizh ouzh Mab Doue ; beilhal a raent ouzh dor al Liorzh gentañ ; difenn a raint treuzoù an neñv ouzh ar re n'o devo ket gwisket arsae-eured. Int-i a zo en-dro d'ar Verb evel un ec'honder sakr, un Templ speredel.

Mont a reont gant ar Verb da gement lec'h maz a, en e raok hag en e c'houde ; emaint en-dro dezhañ, - n'eo ket hepken p'emañ azezet en e c'hloar, met ivez en e zonedigezhioù a bep seurt. Sevel a reont gantañ en-dro *w a r - z u a n T a d, o* tougen en o daouarn an ezañs a zo pedennoù ar re vat. Treizhañ a reont ec'honderioù ar garantez gant ur mibinder n'o deus ket hor c'halonoù sanket e korfoù. Int-i a zo neñvoù an neñvoù, a gomz ar Skritur diwar o fenn, rak an neñvoù gwirion n'int ket an ec'honderioù a weler, met donderion speredel diwelus, gant skinoù a dan, meleziourioù diniver oc'h adskediñ splannder

unel ar Verb.

Evel-se e teu natur-den Jezuz da vezañ an Templ nevez, "al lec'h m'emañ gloar Doue o chom ennañ." Kement-se eo ar pezh a gemenne ar C'hrist d'ar Samariadez pa lavare dezhi : "Dont a ra an eur, ha deuet eo dija, na vo mui da Jeruzalem ma teuio an azeulerion wirion met ma vo adoret Doue a spered hag e gwirionez." Da lavarout eo, ne vo ket adoret en diavaez eus n'eus forzh peseurt templ, met e diabarzh an Templ speredel ha gwirion, a zo ar Mesiaz e-unan gant ar re a zo dezhañ. Setu perak e c'helle ar C'hrist respont d'ar Fari-zianed a damalle dezhañ dianavout an Templ : "Amañ ez eus muioc'h eget an Templ." Hiviziken e c'hello an Templ-se, hini Jeruzalem, bezañ distrujet, n'eus mui ezhomm anezhañ, peogwir, a-benn tri deiz, un Templ all a vo savet, an hini gwirion da badout da viken. Tri deiz, goudeda ouel an Templ bezañ bet roget dre an hanter, e vo adsavet en e splannder hep fin, Templ al lezenn hag ar bedenn nevez, korf glorius Jezuz.

*** **

Nemet etre an daou goulz-se, etre pennkentañ an Templ nevez gant an Enkorfidigezh ha fin an Templ kozh gant ar Basion, ez eus bet ur prantad unel ha dibar ma oa an daou dempl o vezañ war un dro ha maz eo en em ziskouezet en ur sklerijenn vurzhdus mister o darempredoù hag o c'heñveriadur.

An emgav-se eus ar gwirvoud gant ar rakeskeudenn, emgav bev hag istorek, a zo c'hoarvezet evit ar wech kentañ en deiz ar C'hinnigadur : aze ez eus evit gwir ur momed dibar

en heuliad ar mareadoù. Betek-henn ne oa o vezout nemet an Templ skeudennel, da lavarout eo, ar rakskeudenn eus an hini a dlee dont, ar sin eus ar Bromesa graet da Zavid diwarbenn ar Mesiaz. Ha setu bremañ war un dro ar rakskeudenn hag ar wirionez, ar bromesa hag an donezon, en doare ma teu da beurwir kriadenn estlammet ar Salmer : "Accepimus, Domine, misericordiam tuam in medio Templi tui." - "Re-sevet hon eus ho trugarez, Aotrou, e diabarzh ho Templ." (Salm 48,10, hervez ar LXX). E-kreiz kalon ar rakskeudenn eo bet diskuliet ar gwirvoud ; e-kreiz kalon ar bromesa eo bet roet an donezon.

Evit selloù korfel n'eus en Templ nemet ur bugel ; met da selloù Simeon didouellet gant ar Spered Santel eo ar bugel-se muioc'h eget an Templ e-unan, - an hini e oa an Templ ar sin padus eus e c'hortozidigezh. Sed an Temple-se deuet da vezañ didalvoud. Tarzhañ a ra ar vroñsenn ; digoret eo bet an Arc'h siellet ma oa serret enni sekred ar Roue ; diskuliet eo ar Mister, tennet kuit ar ouel ha degemeret an holl bobloù da arvestiñ ouzh Doue. An dra-se eo ar pezh a splanno da zeiz ar Pantekost. Met a-benn bremañ, evit Simeon, eo dija un darvoud c'hoarvezet : "Lumen ad revelationem gentium." - "Gouloù da sklerijennañ an holl vroadoù." Ne oa an Templ-se nemet ur skeud hag ur skeudenn. Sed amañ ar sklerijenn : ar gouleier a lugern etre daouarn ar fideled. "Hep dale e teuo en e Dempl kannad an Emglev." (Malaki.3,1). Sed an destenn, chomet kuzh he ster, o sklaeraat a-daol-trumm dirak daoulagad Simeon ; intent a ra an darempredoù-se etre ar rakskeudenn hag ar gwirvoud a zo ster don ar Skriturioù. Israël en devoa bevet eus ar Skritur, met hep kaout en un doare parfet an

alc'hwez anezhi, ha setu eñ roet hizio. israel a c'hell steuziañ kuit : "Nunc dimittis..." - "Bremañ e lezit ho servijer da vont." Emañ Simeon o terc'hel en e zivoz, e-kreiz an templ, an hini a zo Mestr an Templ.

Emgav an urzhiadur kozh gant an hini nevez, met evit gwir, da gomz strizh, n'eo ket a-grenn an emgav kentañ. Rak mar d-eo Jezuz al linenn-disparti etre an diw grouadelezh, e oa dija eno Mari ul lodenn eus an Arboellerezh nevez, hi hag a zo drezi hec'h-unan ur gwirvoud en e bart. E Templ ar gortoz, hi a oa dija en un doare bennak ur vezañs eus ar barfeter. Mari kinniget en Templ a zo ur rak-kemenn eus Jezuz kinniget, hag an eil darvoud en em garg a dalvoudegezh visterius e-keñver egile : kement a oa o tont da vezañ sevenet a oa dija un dra kaset da benn e kalon Mari, hi hag a oa ar sklaerder o lugerniñ a-raok tarzhan deiz. Evel-se, ar c'hinnigadurioù en em respont evel ur son skañv da gentañ, o vont war gresk tamm ha tamm : emginnigadur Adam en Templ kosmek en urzhiadur kentañ ; kinnigadur Samouel e Templ Moizez ; kinnigadur Mari hag a zo anezhi hec'h-unan un urzhiadur dibar ; kinnigadur Jezuz, sevenidigezh ar pezh a oa gortozet, hag en em zispleg en-dro e kinnigadur pep kristen en Templ en deiz e vadeziant ; kinnigadur e Templ al lidoù douarel a zo ar penn-kentañ eus ar pezh a bado da virviken e Templ an' neñv, pa ginnigo Jezuz d'e Dad tud e Rouantelezh en ur lavarout : "Tad, sed amañ ar re ac'h eus roet din."

Eil emgav Jezuz gant an Templ a zo karget ivez a dalvoudegezh visterius ; hennezh eo hini an Temptadur : "An Diaoul o vezañ pozet ane-

zhañ war dalbenn an Templ, a lavaras dezhañ: "Mar d-out Mab Doue, en em daol d'an traoñ, rak skrivet eo : Reiñ a raio evidout urzhioù d'e Aelez..." Notomp penaos e tremen Temptadur Jezuz e tri lec'h sakr : ar Gouelec'h, an Templ, ar Menez. Hennezh dres eo menoz Satan. Gouzout a ra ez eo stag ouzh an Templ Bezañs Doue. Hag e strivadenn, en e zizesper, a zo ober ma talc'ho da chom en urzhiadur kozh-se, ar Jeruzalem korfel, an urzhiadur yuzev-se, ken danvezel e meur a zoare, a ya dres da enebañ ouzh Jezuz. Kompren a ra emañ eno ar juntr, ar skoulm, ar poent-tremen. Gouzout a ra n'en deus ket da gaout aon evit e rouantelezh hag e vano ar broadoù dindan e berc'henniezh, keit ha ma chomo Bezañs Doue stag ouzh an Templ-maen. Setu perak e klask aesaat da Jezuz e emziskouezadur en Templ ; gouzout a ra e vefe evitañ antren en urzhiadur an Templ. Kinnig a ra dezhañ bezañ Moizez war ur bazenn uheloc'h, - n'eo ket hepken lakaat ar bara da gouezhañ eus an neñv, met e lakaat da zont eus ar vein ; n'eo ket hepken arvestiñ ouzh an Douar prometet eus lein an Nebo, met ouzh an Douar a-bezh prometet d'ar Mesiaz, eus lein ur 'Menez uhel-meurbet' ; n'eo ket hepken mont er-maez eus an Tabernakl gant e zremm enkelc'hiet gant gloar ul lugern gwelus, met en em ziskouez en Templ gant an Aelez en-dro dezhañ, int-i hag a zo ar c'hloar diwelus.

Met setu dres, n'emañ ket Jezuz en urzhiadur Moizez ; n'eo ket ur Moizez uheloc'h e vefe-eñ. Moizez, an Templ, n'int nemet skeudennoù. Aze emañ bremañ ar wirionez. N'emañ mui bezañs Doue e diabarzh mogerioù-mein ; emañ e Jezuz e-unan, hag emañ an Aelez o tont hag o tostaat evit e servijiñ. N'eus mui kaoz eus ar "bara o deus debret hon tadoù," - bara ha ne c'hell

magañ nemet ar c'horf, na kaoz hepken eus an douar prometet da Voizez ha ne oa nemet un hêrezh douarel, nag eus an Templ bet savet gant Salomon ha ne oa nemet ar skeud bannet war an douar eus an Templ neñvel, eñ hag a zo bremañ eno. N'eus ket kaoz evit Jezuz d'ober heñvel tra un eil gwech. An eilskeudenn eo an hini a zo bet da gentañ, met bremañ eo degouezhet deiz ar gwirvoud : burzhud Jezuz a vo ingaliñ d'an dud ar gwir vara gant ar Goan diwezhañ, sevel ar gwir Dempl gant e zasorc'h, lakaat e bobl da antren er rouantelezh wirion gant e Bignidigezh. "An Diaoul, neuze, a zilezas anezhañ hag an Aelez a dostaas evit e servijiñ."

An holl emgavioù all eus ar C'hrist gant an Templ a zo leun a dalvoudoù heñvel. Dre skeiñ er-maez eus an Templ ar werzherion ec'h anata Jezuz ez eo an Templ douarel ur skeudenn eus santelezh an Templ neñvel gwirion. Gant mam-menn-dour an Templ bet diouganet gant Yec'hezekel, pa gemer Jezuz da zigarez d'e gomzoù en deiz Gouel an Teltennoù, an dour a zivere evit ar gwelc'hadurioù-lid, e tiskuilh ar Salver ar wirionez a ya bremañ da vezañ : "Maz eus unan bennak o kaout sec'hed, ra zeuio davedon ha ra evo." An eien arouezel, ar gwelc'hadurioù-lid a zo traoù echu. Ar vammenn-dour a zo o strinkañ en Templ gwirion eo ar Spered Santel o tarzhañ en natur-den Jezuz. Evel-se emañ Jezuz o stagañ outañ e-unan holl berzhioù mat an Templ, rak eñ eo an hini a gas al Lezenn da benn ; ha pa'z en devo sevenet al labour-se, pa vo peurechu gantañ e oberenn, pa vo bet diazezet da badout an urzhiadur nevez, neuze, met neuze hepken, e welo an Templ kozh deuet da vezañ didalvoud hivi-

ziken, e ouel o regiñ eus al lein d'an traoñ.

Gant an dra-se eo urzhiadur al Lezenn a gav e glozadur. Daou dra a verke anezhañ: an disparti etre Doue hag an den, ar Vezañs en ul lec'h hepken. Ha kement-se a gemm gant an Templ nevez hag a zo Jezuz. Ar ouel hag a serre Santual ar Santualioù a zo roget ; da lavarout eo ez omp degemeret en-dro e mignonezh Doue : "Evel-se eta hon eus surentez da c'hellout antren e-barzh ar Santual dre wad Jezuz, dre an hent nevez ha bev-se en deus digoret dimp a-dreuz ar ouel,- da lavarout eo, a-dreuz e gorf e-unan." (Hebr.10,19-20).

Kement-mañ n'eo ket un distro hepmuiken d'an Templ kosmek ; met goude ar buridigezh mennet gant Lezenn Moizez, eo un hent digor d'ur vezañs uheloc'h, - eo antreadenn an Denelezh e Santual ar Santualioù, ha n'eo ket mui hepken bezañs naturel Doue en e grouadelezh. Na, kennebeud-all, n'eo mui ar vezañs-se stag ouzh ul lec'h unel. Stag eo ar Vezañs ouzh unan bev, ar Salver, eñ hag a zo an Templ klodus, unel, divizet da virviken, met stag ouzh ar C'hrist en e leunder, da lavarout eo, ouzh ar C'hrist gant e gorf kevrinus ; e gorf hiniennel, e gorf kevrinus, - setu bremañ lec'h an azeulerezh" a spered hag e gwirionez."

.....

IV

AN TEMPL
HAG A ZO AN ILIZ

Jezuz-Krist evel den eo an hini a zo templ al Lezenn Nevez. Met en tu-hont d'e natur-den hiniennel, korf hag ene, e tleer gwelout ivez ez eo denelezh Jezuz a zo an Templ nevez, ez eo ivez e gorf kevrinus, da lavarout eo, ar re a zo dezhañ evel izili e Rouantelezh. Sed aze an Templ nevez en e leunder evel ma tle hivi-ziken padout da viken.

Chomadur Doue eo eta ar Gumuniezh kristen emañ en neñv ar Penn anezhi, ha war an douar an izili o seveniñ o fiñc'hirinded. Sed aze an templ gwirion e oa an templ mein ar skeudenn anezhañ. "C'hwi ivez, evel mein bev, bezit danvez an Templ speredel a zo o sevel ; deuit da vezañ ur velegiezh santel evit kinnig sakrifisoù speredel plijus da Zoue dre Jezuz-Krist." (LP, 2, 5). "Evel-se 'ta n'oc'h ket mui estrenion nag ostizidi, met ken-vroiz ar Sent ha tud eus Ti Doue. Savet oc'h bet war ziazez an Ebestel hag ar Brofeded, Jezuz-Krist e-unan o vezañ maen-uhel ar c'horn. Ennañ-eñ, an Aotrou, emañ an holl savadur o'n em stummañ hag o kreskiñ da vezañ un Templ santel ; ennañ, c'hwi ivez, hoc'h eus

ho plas er savadur da vezañ Ti Doue er Spered ..." (Ed.2, 19-22)

Un diforc'h groñs a zo etre Templ Jeruzalem hag an Iliz kristen. El Lezenn gozh e veze stag bezañs Doue ouzh ar savadur-maen ; el Lezenn nevez eo stag ouzh ar gumuniezh spere-del. Hon ilizoù-maenn'int ket hervez stumm an Templ, met hervez doare ar Sinagogenn,lec'hioù a emvod, ecclesia, bodadeg. Pe gentoc'h e talc'hont da vezañ an eil hag egile,peogwir ez int ivez al lec'h reoliek evit ar sakrifis.Nemet e c'heller tremen hep ober ganto ; n'eo ket ret bezañ en un iliz evit gellout oferennañ. Ar gumuniezh avat a zo ret, rak n'heller ket lavarout an oferenn hep ma vefe en ano an Iliz.

"Setu adarre evidomp un ti d'ober hon fedenn ennañ,

Un Templ nevez n'hell ket konnar Satan mougañ e lampoù

na disrannañ e volzioù diamantek,

Gwelout a ran dirazon an Iliz Katolik a zo eus an hollved..."

(Paul Claudel, Cinq grandes odes. P.176.)

Evel-se eo sevenet komz Jezuz: "El lec'h ma vo bodet meur a hini em ano, eno e vin en o c'hreiz." Sed ar pezh 'zo rekis dreist pep tra evit kinnig ar brofadenn plijus da Zoue ; ha gant se e lavar ar Brezegenn war ar Menez : "Mar deuez da zegas da brof d'an aoter, hag eno, mardeu soñj dit en deus da vreur un dra bennak a-enep dit, lez eno da brof dirak an aoter, ha kerzh da gentañ d'ober ar peoc'h gant da vreur, ha neuze deus da ginnig da brof." (Mazhe,5, 23-24). Ne vez degemeret ur brofadenn nemet digant an hini a zo er garantez, er gumuniezh ; rak sed aze an Templ, al lec'h nemetañ ma c'hell an den en em zerc'hel

ennañ dirak Doue.

Un dra dreist-par eo kement-se, un dra ken souezhus war e dachenn ha bezañs Doue e Templ Jeruzalem.Doue en em laka en darempred - n'eo ket gant eneoù digenvez,met gant eneoù lodek er gumuniezh. E lidoù ar Vadeziant,antre ar c'hatekizad en iliz-maen a zo ar skeudenn eus e antre en Iliz vev an eneoù,er Gumuniezh lec'h ma vez kejet gant Doue. Eus ar gejadenn -se gant Doue eo Sakramant an Aoter ar sin anezhi, pa'z eo war un dro sakramant ar c'horf kevrinus ha merk bezañs gwirion ar C'hrist, pa vez sevenet war un dro gant ar sakramant-se an unvaniezh ouzh Doue hag ar garantez e-keñver an nesañ. Ar pec'hed, evit gwir, en deus da efed hon pellaat diouzh Doue ha war un dro hon disrannañ diouzh ar gumuniezh. Kement-se a veze merket sklaer gant reizhadur an Iliz kentañ pa lake ar pec'her foran (a-ouez d'an holl) er-maez eus ar Gumuniezh. Bremañ c'hoazh bepred e chom ar pec'her er-maez eus ar Gomunion. Hag an distro e peoc'h Doue a vez graet dre ret dre gumuniezh an Iliz : sed aze ster sakramant ar Binijenn, lec'h m'emañ ar beleg oc'h ober en ano kumuniezh an Iliz, a zo hi hec'h-unan o talvezout evit Doue.

Setu perak emañ an Iliz o virout evel tra fiziet enni, Komz vev Doue. Enni emañ ar gomz -se o chom en un doare kevrinus, evel un astenn da enkorfidigezh ar Verb: "Degaset e vezer d'ar feiz er C'hrist, n'eo ket dre studi dielloù maro, met dre vezañ heñchet gant un testeni bev, hini un organadur buhezekaet gant ar C'hrist, dre gelennadurezh an Iliz vev hag abostolek ; ha goude-se, en un doare leun,dre stekiñ war-eeun ouzh ar C'hrist o vevañ en Iliz, dre labour ar C'hrist e-unan oc'h efediñ

en-leun er sakramantoù."
(Karl Adam : Dremm wirion ar Gatologiezh.)

Stag maz eo ouzh an Templ nevez maz eo ar Gumuniezh, eo liammet bezañs Doue ouzh ar garantez : "Mar en em garomp kenetrezomp emañ Doue o chom ennomp." (1 Yann,4,12). Ar gumuniezh kristen n'eo ket ur gumuniezh a vuhez danvezel evel un askre lec'h e c'hoantafe en em c'houderiñ personelezhioù chomet bugelel ; met ur gumuniezh a bersonelezhioù spredel ez eo an Iliz ; da lavarout eo, al lec'h ma laka pep unan da vezañ e dra ar c'hoant en deus pep unan da gaout boud gant leunder. N'eo ket un distro etrezek an orin ; n'eo ket an hiraezh d'ur stad kentañ, distumm c'hoazh, - met ur groudigezh dizehan eo ar garantez, evel m'eo bet uhelveulet gant sant Paol : "Eñ, ar C'hrist, a ro d'ar c'horf a-bezh unvaniezh ha kevreadurezh, en doare ma resev pep ezel dre an holl liammoù, nerzh da labourat hervez e stumm, ha ma teu ar c'horf da greskiñ ha d'en em sevel e-unan er garantez." (Ef.4, 16)

Labour ar garantez eo savidigezh an Temple-se, gwirion. Labour hag a zo da gentañ-holl, krouidigezh, servij, efedusted. Kammgemer a reer a-wechoù ar garantez evit un deneridigezh pe ur gwander hon laka da asantiñ da c'hoantoù un all hag en em ober dezhañ, ha pa vefe evit e wall. Ar garantez n'eo tamm ebet al laoskentez nag al lezober-se. "Kalet eo evel ar maro," evel ma lavar Kanenn ar C'hanennoù. Ober plijadur a zo alies ar c'hontrol eus ober vad. Didruez eo ar garantez wirion. Ne gar ket ar gwanderioù; karout a ra daoust dezho, a-enep dezho : addresañ a ra. Met kaleter ar garantez a zo fiziañs, skoazell, harp. Klask a reomp-ni diskouez nerzh gant flemmadurioù,

gant kunujennoù, met ar garantez eo an hini 'zo nerzhus e gwirionez : kalet e-keñver ar re all, met da gentañ kalet eviti hec'h-unan ; kalet evel an diamant, spis, boull, hag o vont betek ar strad : kalet met hep gloazañ. An drouknerzh a vloñs ; ar flemmadurioù a bik evel ar spilhoù ; ar garantez avat a ya e-barzh ar galon evit pareañ.

"Ar garantez ez eus pasianted ganti," netra dihabask enni. Evel tad ar mab foran e oar gortoz eur Doue. Ur c'hi feal ez eo. Pedit a ra gant sioulder. Ne glask ket he gonid ; ne c'hoanta netra en distro ; kaout a ra he flijadur e mad an hini karet ganti : eno emañ he gopr ; en em ankouaat a ra. Ne ra van e vefe graet ar mad c'hoantaet pe ganti pe gant un all, nemet ha graet e vefe. Karout a ra ar mad evit ar mad. Ne laka ket he flijadur en hec'h oberennoù ; ha gouzout a ra paouez pa n'eus mui netra d'ober. Ne gav ket he flijadur oc'h en em zispign er goulo. Gouzout a ra espern. Ne glask ket an trouz nag an embannezh, met hepken an efedoù mat. N'he deus ket amzer da soñjal enni hec'h-unan, rak karout a ra ar gwirvoud. Ha pep gaouierezh a vez kasaet ganti. Resis, evezhiek, didouell, dibompad ez eo. N'eo ket gerioù a vefe a-walc'h eviti. N'eo ket stag ouzh an diavaezioù, ar gizioù hag an ismodoù degemeret.

"Ar garantez ne sant ket ar skuizhnez." Emañ dalc'hmat war al labour, fin ebet eviti, chalet maz eo gant ar pezh a chom d'ober. Esperit a ra pep tra. Gouzout a ra n'eus netra dic'hallus da Zoue ; esperit a ra en tu-hont da bep esperañs. Krediñ a ra pep tra mat ; bepred e vez tromplet, met trec'hiñ a ra gant se war an disfiziañs a ren etre an holl ; faezhañ a ra an droug dre ar mad ; rediañ a

ra ar re all d'ar wirionez, rak war un dachenn uheloc'h emañ, ha degas a ra di ar re all. An eneoù neuze en em zizolo dezhi : fiziañs o deus o welout he faourentez. Lakaat a ra ur galv da sevel en dud. N'heller ket dirazi c'hoari ar maskloù. Rediet e vezer da anzav, - da ziskouez ar goulioù kuzhetañ. Ha gant en em santout karet daoust da bep tra a garantez divrall, karantez o tiskenn betek en donañ eus hon reuzeudigezh hep gloazañ, hep goapaat, ec'h adkav an hini 'zo er brasañ dizesper, ar c'hoant da vevañ.

*** **

An Templ-se o sevel hag oc'h en em stummañ evel-se dre ar garantez a zo Templ Moizez ha war un dro Templ ar Bed kaset da benn. Diwar-benn an Iliz e c'hell pep kristen lavarout e gwirionez ar pezh a gane ar Yuzevion diwar-benn Templ Jeruzalem : "Aotroù, karet em eus splander ho ti hag al lec'h m'emañ ho kloar o chom... Un dra am eus goulennet digant an Aotroù, en resev a rin : bezañ o chom e ti an Aotroù a-hed holl deizioù va buhez." (Salm 26,8;23,6;27,4). Met an Templ hiviziken n'eo mui ar Menez m'en em droe war-zu ennañ c'hoantoù ar bobl dastrewet ; emañ ganimp ; a-walc'h eo dimp en em soñjal evit en em gaozout e kumuniezh ar Sent : "Hor Salver Jezuz-Krist, goude pignat d'an Neñvoù, n'en deus ket lezet war e lerc'h ar bed evel m'en devoa kavet anezhañ. Lezet en deus er bed ar pezh na oa ket en e raok : un tan kuzh, e c'hell ar feiz hag ar garantez adkavout anezhañ e pep lec'h en desped d'ar bed a zo en-dro dimp. Iliz Doue eo an hini a zo hon chomadur gwirion aozet gant Doue, e-lec'h m'emañ o chom

e-unan gant E Aelez hag e Sent. Hag evidoc'h da vezañ en ur c'horf a gig, da vezañ izili eus ar bed-se, n'hoc'h eus nemet daoulinañ doujus d'ober evit bezañ diouzhtu ganto en o c'hevredigezh." (Newman: Prezegenn diwar-benn an Iliz.) Sed ar pezh a gemenne Jezuz d'ar Samariadez pa lavare dezhi ne vefe ken hepda-le adoret nag e Jeruzalem na war lein ar menez Marizim, met e felle d'an Tad kaout azeulerion a spered hag e gwirionez, da lavarout eo, tud oc'h adoriñ en Templ gwirion, en Tabernakl speredel.

An Iliz a zo ivez an Templ kosmek kaset d'e barfeted. Ha seul wirionoc'h eo kement-se maz eo trec'h d'ar C'hosmos a-bezh an Templ-se hag a zo pep maen anezhañ, pep ene, drezañ e-unan, ur bed en e bezh, pa'z eo gwir "ez eo pep spered kement ha pep tra" (Sant Tomaz Akuino : Summa Theologica), hag "e talv ur soñj hepken eus eus spered an den muioc'h eget ar bed danvezel a-bezh" (Yann ar Groaz : lavarou - stur hag alioù). Arabat d'ar ger Templ hon lakaat amañ da faltaziañ n'ouzon peseurt savadur diflach ; ar pezh hon eus da welout gant mezevell eo ur bed speredel oc'h en em astenn hep fin ; emañ an Templ Iliz o frankaat hag o kreskiñ didermen, bannet en egor an Neñvoù, evel e kopolenn baroko an Nepomuk-Kirche e München, ar volz vezevellus o tigiñ war ec'honderioù diziwezh.

Krouidigezh an Iliz a zo krouidigezh ur C'hosmos nevez ne oa an hini kentañ nemet ar ragaozadur hag ar rakskeudenn anezhañ. War ar C'halvar, pa'z a kuit ar bed kozh ha pa grog an urzhiadur nevez, e weler gouel an Templ o regiñ da gemenn e oa dirasket Lezenn Moizez hag ec'h antree gouenn an dud en

Templ gwirion, ha war un dro an heol o teñvalaat (Mazhe, 27, 45), rak krouidigezh ur bed nevez eo an hini a c'hoarvez, hag emañ an heol nevez a zo e sked o trec'hiñ gant e splannder divent war an hini kentañ. Ar bed nevez eo an hini en devoa diouganet Izaia pa lavare e vefe neñvoù nevez ha douaroù, an hini e komz sant Yann diwar e benn en Diskuliadur o teskiñ dimp ne vo mui ezhomm eus an heol, rak "an Oan e-unan a vo e sklerijenn." (Disk. 21, 1; 22, 5).

Evel maz eo an heol mammennarvuhez o vleuniañ war an douar, evel-se eo ar C'hrist, heol an eneoù, an hini 'zo mammenn buhezus ar bed speredel. Eñ eo a zo bet salutet en e c'houlou-deiz gant Zakaria ha Simeon evel an "heol-beure deuet eus an uhel d'hon gweladenniñ." Evel ma par an heol er Reter, evel-se ar C'hrist hervez ar Skritur. E tu ar Reter e oa plantet ar Baradoz kentañ ; hag etrezek ennañ n'o devoa ket paouezet an dud da dreiñ o selloù ; eus ar reter eo deuet an Aotrou. Rak eñ a zo ar Baradoz adkavet, ar grouadelezh kentañ adreset. Ha war - zu ar Reter eo bepred e talc'homp da sellout, o vezañ maz eo e tu ar Reter ez eo savet d'an neñv en deiz e Bignidigezh, ha maz eo e tu ar Reter e tle dont en-dro evel ul luc'hedenn war an dremmwel. En abeg da se ez eo war-zu ar Sav-heol e vez troet an ilizoù, ez eo war-zu ar Sav-heol en em stegn gant o holl nerzh an eneoù leun a c'hoant, sachet maz int gant un dedennerezh diwelus etrezek heol ar c'halonoù ; ez eo eus ar Reter e c'hortoz ar venec'h evezhiek, savet -araok gouloù-deiz, heritourion ar gristenion gentañ, paridigezh an heol, evel ar skeudenn, ar sin pemdeziek eus sav-heol ur sklerijenn all : "O gouloù-deiz, splannder al luc'h peurbadel hag

heol a reizhder, deuit ha sklerijennit ar re buchet en deñvalded hag e skeud ar maro." (Antifonenn O). An heol bemdez a zo dimp un arouez eus donedigezh kentañ ha diwezhañ an hini 'zo ar sklerijenn beurbadus.

An Templ kosmek o tremen da vezañ uheloc'h tra, da vezañ an Templ-Iliz, kement-se a chom merket el Liturgiezh, pa ne vefe nemet gant gouel Nedeleg, hag en deus kemeret lec'h an Natale Solis Invicti ('adginivelezh an heol di-drec'hus') eus ar Romaned. Gant-se, ar C'hrist en em ziskouez dimp, n'eo ket hepken evel an heritour eus urzhiadur ar Yuzeviezh hag eus Templ Moizez, met ivez evel an heritour eus an urzhiadur pagan hag eus an Templ kosmek.

"Resev a rae da hêrezh an douar ha Roma
Hag ar mor limestra ha menez serzh Sion."
(Péguy : Eve).

Perzh dibar Nedeleg a zo anataat an dra-se dimp, dre vezañ - n'eo ket war linenn ar gouelioù yuzev, Pask, Pantekost, an Teltannoù, na dre vezañ un heuliad d'ar pezh a c'hortoze Israël, na, zoken, dre vezañ diouzh doare al lidoù pastorel eus ar Reter palestiniat, met dre en em lec'hiañ war linenn ur c'hortozidigezh all, hini ar furion bagan oc'h eveshaat ouzh ar stered, pezh a zo skeudennet gant ar Vajed o tont e-tal kavell ar Salver e-kichen ar veserion. Rak an heol danvezel ha gwelus a oa en Templ kosmek ur rakskeudenn eus an heol diwelus hag ur gortoz eus ur sklerijennadur all, evel ma oa antre pepbloaziek ar Beleg-meur e Santual al Lezenn gozh, ur rakskeudenn eus antre ar Beleg-meur gwirion ha peurbadus e Templ an Neñv. Setu perak el Lezenn nevez e talc'h an heol, hervez muzulioù hor buhez o chom bepred dindan menterezh ar c'houked

hag an noz, da vezañ al lidarouez pemdeziek eus paridigezh an heol nevez evit biken. Un deiz erfin a zeuio ma vougo sklerijenn an heol bedel ha na lugerno mui nemet ar sklerijenn wirion ; neuze n'hor bo ket ezhomm eus skeud-ennoù ; neuze, e neñv an deiz peurbadel, e vamo hon daoulagad gant gweled un heol na vo dezhañ kuzh-heol ebet, un tarzhan-deiz diziwezh, paridigezh bepred nevez an heol a reizhder.

oooooooooooooooooooooooooooo

V
AN ILIZ
EVEL SIN HA PEURSEVENIDIGEZH
AN HOLL DEMPLOU

Evel-se, an Templ nevez en deus kemeret lec'h an Templ yerozolimat ha lec'h an Templ kosmek. Ar re-mañ n'o deus mui d'ober nemet mont da get : "Evel-se eo bet torret an urzhiadur kentañ en abeg d'e zidalvoudegezh ; bet eo avat an digoradur d'un esperañs gwelloc'h a ro dimp tostaat ouzh Doue." (Hebr. 7, 18-19). Ar rakskeudenn n'he deus mui-ken talvoudegezh, pa oa en he c'harg rakkemenn ar pezh a zo bremañ c'hoarvezet. An Templ nevez, eñ, a zegas ur gwirvoud uheloc'h ha dreist-par. N'eo ket ken a-dreuz sinou an oabl hag an neñv en divije an den da glask roudou Doue, pa'z eo paret an heol gwirion war un hollved nevez, ur wech da vat ha da viken. N'eo ket ken en ul lec'h hepken eus an douar hor bize da antren evit en em gavout dirak an Doue bev ha gallout e azeuliñ ; bremañ eo war an douar a-bezh m'en em astenn an Templ nevez, hag a-walc'h eo da zaou zen bezañ bodet en ano Jezuz evit ma vefe-eñ o chom en o c'humuniezh.

Met n'eus koll ebet gant raskidigezh an urzhiadur kentañ : rak setu dilamet kuit an

dibarfeterioù a oa ennañ, tra maz eo miret e binvidigezhioù ; n'eus netra dilezet, hogen pep tra 'zo adkemeret, uhelaet, adstummet da vezañ ur sin parfetoc'h ; ur wellidigezh, un araokidigezh wirion ez eo. Hag evel ma talc'he Templ Jeruzalem da vezañ sin an Templ kosmek, evitañ da vezañ kemeret e blas, evel-se emañ an Iliz o talvezout evit Templ Jeruzalem ha Templ ar bed en ur genderc'hel anezho.

Kinnig a ra an Iliz ar sakrifis nevez hervez ar reoliadurioù lidadurel a-wechall. Emañ an oferenn o kaout enni an holl ventoù eus an amzer hag an ec'honder, eus ar C'hosmos hag an Istor. Hon lakaat a ra da adkavout e donderioù hon eñvor gourdadell jestr relijius kentañ an den, profadenn ar bara hag ar gwin, kinnigadenn Melkisedek, arc'hveleg an Templ kosmek, evit ober anezhañ sin he sakrifis : "Evel m'hoc'h eus degemeret mat profoù ho servijer Abel, an den just, Sakrifis Abraham, hon tad, hag hini Melkisedek, ho peleg-meur." War dreuzoù Santual ar Santualioù lec'h ma tleomp antren gant eneoù puraet, e lak ac'hanomp da santout brasañ doujañs dirak Doue gant an diskleriadur uhelañ a gavomp el Lezenn eus an doujañs-se : "Santel, santel, santel, an Aotrou Doue, Mestr ar Bed !" Pep tra en em gav amañ kenstrollet, adlakaet splann en e dalvoudegezh, addegaset da Zoue dre ar C'hrist : "Drezañ bepred e krouit pep tra..." Hon lakaat a ra da vezañ test gant an Epiklezenn (2) eus diskenn an tan o tont da guzumiñ ar profadoù lazhet da ziskouez ez int bet degemeret mat gant Doue, tan ha n'eo mui ar flamm danvezel a ziskenne war ar profadoù korfel kinniget gant Elia war e aoter, met flamm speredel ar Spered Santel o tont da bulluc'hañ saotradurioù ar c'halonoù ha da

sakriñ ar gumuniezh sinadekaet gant ar profadoù : "Evit ma tiskenno pep gras ha pep bennozh warnomp d'hon leuniañ, ni holl hag a gemero diwar an aoter-mañ korf ha gwad ho Mab, hor Salver Jezuz Krist."

Ar pezh a zo gwir diwar-benn an Oferenn a zo ken gwir all diwar-benn holl urzhiadur an Iliz. Ne gemerin nemet ur skouer, hini ar gouelioù bras eus al liderezh: Pask, Pantekost, an Telttennoù. Da gentañ ez int tri gouel eus lid an amzer, tri lidadur eus an Templ kosmek: Pask a zo gouel ar c'hentañ pennoù-heiz, ha setu perak e veze profet neuze bara dic'hôell, baraennoù aozet hep gôell da c'hortoz ma teufe hemañ d'en em ober diouzh an toaz aet e go. Ar Pantekost, hanter-kant devezh goude, a zo gouel an eost ; an Telttennoù, e miz Gwengolo, a zo gouel ar vendem hag ar frouezh, pa veze savet er gwiniegi foukennoù gant brankoù ha glazur da ziwall ar rezin. Gant Moizez eo talvoudegezhioù nevez a zeuio d'en em enskrivañ war ar re gentañ, hervez an darvoudoù c'hoarvezet da geñver ar gouelioù-se e relijion ar Sinaï : Pask, hag a gemer neuze e ano, a vo Yahve o "tremen", oc'h espern ar re gentañ-ganet eus ar Yuzevion hag o tieubiñ e bobl ; ar Pantekost, hanter-kant devezh goude, a vo diskuliadur ar Sinaï, gwelidigezh an Tabernakl, teofaniezh Yahve en taran hag er goabrenn ; an Telttennoù, erfin, a zegaso soñj eus ar chomadur er gouelec'h e-pad daou-ugent bloavezh dindan an Telttennoù. Evel-se ar ritoù kozh a dremen d'ur steriegezh nevez.

An Templ-Iliz d'e dro a zalc'h d'ober gant ar gouelioù kozh ; dastum a ra an elfennoù kentañ evit o adurzhiañ ha reiñ dezho sinadegzh peurleun, en ur verkañ gant se ne oant

nemet rakskeudennoù eus ar pezh a dlee dont : Pask eo deiz an dieubidigezh, n'eo ket eus an Ejipt, met eus ar pec'hed; an deiz m'eo lazhet an Oan gwirion, an deiz m'eo espernet an hini kentañ ganet eus a douez ar re varo ; an deiz ma vez ingalet ar bara dic'hôell gwirion. Peseurt dorn nemet hini ar Salver, eñ hag en deus lavaret e oa deuet evit kas pep tra da benn, a c'helle dastum gant an aked-se holl vruzun ar banvez kozh, hep lezel netra da vezañ kollet, evit ober anezho sinoù ha sakramantoù ar Vuhez wirion ? Ar Pantekost a zo skuilhidigezh ar Spered, er c'hurunoù hag er goabrenn, evel er Sinaï, met ar wech-mañ e sell eus ar chomadur da vezañ sevenet, n'eo ken en un Templ savet gant dorn an den, hogen en Templ nevez-se a zo kalonou ar Fideled. An Teltennoù erfin ha n'o devoa un dason resis el liderezh nemet gant sadorn Daouzek Deizioù Gwengolo, en em led evit gwir war an amzer goude ar Pantekost a daolenn dimp ar vuhez kristen evel un hent a-dreuz d'ar gouelec'h betek Douar ar Bromesa - betek an neñvoùavo ar chomadur da badout goude teltennoù dibad ar gantreidi.

Sklaer eo n'eo ket dre zegouezh, met dre ur mennad anat eus Doue ez eus bet laket seurt darempredoù etre misterioù bras diskuliadurezh ar C'hrist hag ar gouelioù yuzev, evit merkañ dre se e oa ar re-mañ raktresoù eus ar pezh a dlee dont ; hogen n'eus tu ebet d'ober eus mister ar C'hrist un dra par d'ar pezh a oa en e raok : un dra nevez a-grenn ez eo, daoust d'ar peurvezder-se kemer lec'h en un hengoun, en ur gendalc'hegezh a zo unander mennad Doue. Mar dalv ar ger 'Istor' un dra bennak, mar lavar war un dro araokidigezh ha kendalc'hegezh en un hevelep lañs o reiñ ur ster meizus d'an darvoudoù, eo amañ, hag amañ

dreist-holl ma kav e wirionez. Ur vezañs eus Doue en em ziskouez gant se : rak ur vezañs eus Doue a zo en Istor, evel maz eus unan en amzer. Ur vezañs eus Doue a zo er badelezh, evel maz eus unan en ec'honder; hag ar vezañs-se a zo Doue o chom e templ ar badelezh, templ a c'heller ober anezhañ an templ profedek; rak bezañs Doue en em ziskuilh ennañ gant un araokidigezh dizehan diskouezet gant pep marevezh, pep amzervezh : oadvezh Moizez a zo araokidigezh leun e-keñver an oadvezh kosmek, ha oadvezh ar C'hrist a zo klokted oadvezh Moizez, tra ma vez raktreset pep marevezh gant an hini a-raok, pezh a zo da vat profediezh. Evel-se ar C'hrist a zo bezant en Istor a-bezh, bezant ha kuzh war un dro e santual an Templ profedek e-lec'h m'emañ o'n em ziskuliañ mui-ouzh-mui. Hag an Eôn ('ar Bed') a-vremañ (3) ned eo-eñ e-unan nemet skeudenn an Deiz da zont, ar sizhunvezh o prientiñ ar Sul. Ar vezañs-se eus Doue en amzervezh, goude e vezañs en ec'honder, eo an hini a zo anavezet gant Otto en e levr diwar-benn ar sakrel : "An neb en em dro da arvestiñ ouzh ar gendalc'hegezh-se a anvomp an Emglev betek ar C'hrist, a sant diouzh ret pe dost, o parañ dirazañ, un dra bennak peurbadel."

Arvestiñ ouzh bezañs Doue en Istor a zo gouzout lenn ar Skritur. Ar C'hosmos hag ar Skritur, sed aze an daou Dempl bras e-lec'h en em guzh Doue enno dindan sinoù an Tabernakl : ha maro ar C'hrist eo an hini a rog ar ouel, a ziskuilh o ster hag a ziskouez dimp penaos e oa bezant dindan ar sinoù. Setu perak an emsoñj hag ar prederiadur war ar Skritur a oa evit Tadoù kozh an Iliz al labour o dalc'he. Evito ne oa ket kement-se studi hepken, met un arvesterezh gwirion eus Doue

bezant en e Skriturioù, hag anavezet dre e zonedigezh nevez en ur c'horf-den. Evel-se, evit Origenes ez eo ar Skritur : "Ar sin dibabet gant Doue eus bezañsar Gomz evel komz, er bed, lestr prizius ar vuhez speredel, mammenn diheskus ar vuhez doueel." Ar Yuzevion a gehele er Bibl bezañs Doue, met teñval e chome evito, golet ma oa o daoulagad gant ur ouel. Hogen gant ar C'hrist eo bet dilamet ar ouel, hini Templ Jeruzalem hag hini al levr siellet, ha galvet eo ar pobloù da antren en eil hag egile - da antren e komunion ar Verb bezant en ec'honder hag er badelezh.

Gant se eo ar Gristeniezh a rent d'an Istor he c'hevrin, dre ziskouez enni bezañs Doue. En lavaret hon eus diwar-benn an ec'honder en ur gomz eus an Templ kosmek. Evit ar c'hristen n'eo ket an ec'honder egor kleuz an naturourion na vefe nemet keñveriadurioù digorf, na kennebeud-all n'eo ket an hollved disakret gant an den pa ne wel ennañ nemet un danvez a blijadurezh. Evit gwir ez eo lec'h ur vezañs - Ti Doue.

Hevelep tra gant ar badelezh. Ar Brofediezh, gant hec'h eeunwelerezh, a rent e gevrin d'an Istor. Ne wel ket an Istor, evel ma ra ar boellegouriezh, e stumm un araokidigezh danvezel, hep gwellidigezh speredel wirion. Na kennebeud-all, ne wel ket an Istor, evel ma ra eus un tu disheñvel, an dibollegourion, a ra anezhañ un heuliad a sevenadurezhioù peurdisheñvel, troc'het ha dispartiet an eil diouzh eben, hep furnez ebet d'o liammañ (4). En daou venoziadur-se n'eus bezañs doueel ebet, kevrin ebet ken, met poellegezh pe degouezh nemetken. Ar Brofediezh avat a ziguzh en Istor ur c'halloudegezh ha war un dro ur furnez, ha gant se ur vezañs speredel ; ha n'eo ket di-

guzhat anezhi a ra hepmuiken, met he diskuliañ he diskouez. Reiñ a ra dimp an tu d'hec'h azeuliñ.

*** **

An araokadurioù-se eus an Istor n'eont ket avat hep troc'h na rogadur. An tremen eus ur bazenn d'eben, ha goude ma vefe peursevenidigezh an urzhiadur a-raok, ha ma virfe en ur stad uheloc'h ar pinvidigezhioù kent, a c'houlenn ez afe da get an urzhiadur kozh-se en e vezoud dezhañ e-unan. Sed aze drama mister Istor : "Distrujit an Templ-se hag en adsevel a rin." Da lavarout eo, e ranke, evit d'an Templ nevez gallout en em ziskouez, e vefe distrujet an Templ kozh. "Ret e oa d'ar C'hrist mervel" e kement ha m'en devoa en em heñvelaet hag en em staget ouzh urzhiadur al Lezenn, evit digeriñ gant e Zasorc'h un urzhiadur nevez. Eno emañ unan eus sterioù kevrinus ar Basion. Maro ar C'hrist a zo distrujidigezh an urzhiadur kozh, hini al Lezenn, m'en devoa en em c'hraet kenstag outañ, evit en distrujañ ennañ e-unan, hag e oa an distrujidigezh-se un dra rekis evit diazezidigezh an urzhiadur nevez hag "evel-se antren en e c'hloar." Maro ar C'hrist a verk an troc'h hag an dispartietre an daou urzhiadur ; anataata ra o digen-glotusted. Hag ar mister-se eo an hini a vez adsevenet e pep kristen gant e vadeziant, mister a varo hag a zasorc'h, en doare ma vez adprientet en-berr, e pep den, mister an Istor a-bezh. Mister ar C'hrist a zo peursevenidigezh ar rakskeudennoù hag o distrujidigezh evel skeudennoù : kondaoniñ a ra an neb a chom stag ouzh ar rakskeudenn, hep asantiñ tremen pelloc'h.

Sed aze ivez ar perak eus enebiezh ar Yuzevievezh ouzh ar C'hrist : diskouez a ra an urzh kozh o'n em sevel a-enep an hini nevez dre n'hellont ket bezañ un hevelep tra ; un disparti, un digendalc'hegezh a rank bezañ. Ha sed ivez ar perak eus argasidigezh Israël. Talvezout a ra da ziskleriañ ez eo dirasket Israël evel raktres. Unan eus misterioù donañ an Istor eo se, ha sant Paol en em soñj da vat warnañ en e lizher d'ar Romaned : "Ne fell ket din, breudeur, e chomfec'h dic'houzvez eus ar mister-se, gant aon na soñjfec'h bezañ tud fur : ul lod eus tud Israël a zo kouezhet dallentez war o spered, betek ma vo aet engroez ar Broadoù e-barzh. Neuze ivez eo Israël a-bezh a vo salvet." (11, 25-26). Donezonoù ha galv Doue e-keñver Israël a zo hep morc'hed, met distaolidigezh Israël evel Israël a oa ret da ziskleriañ raskidigezh an urzhiadur kent : un hevelep tra ez eo gant distrujidigezh Templ Jeruzalem, un hevelep arboellerezh. Hogen dedennañ a ra muioc'h hon evezh o vezañ ma sko ouzh tud vev. "Ret e oa," a skriv Origenes, "en em savfe a-enep Jezuz henaourion Jeruzalem hag he skribed, anezho ar rakskeudenn enkorfet bev, evit ma vefe rentet grasoù d'ar C'hrist gant henaourion an Neñv, gant ar Briñsed speredel, gant ar Skribed a daol pled ouzh al lizherennoù engravet er c'halonoù gant ar Spered santel." (Origenes, In Matt. P.G.1027 B, 1029B).

Sin an Templ en em ziskouez dimp neuze gant un dremm nevez : an enebiezh bet kemenet gant Simeon en deiz kinnigadur Jezuz en Templ an hini eo, evel pa vije bet meizet gantañ an darempredoù dramaek a oa da vezañ etre ar bugel-se a zalc'he etre e zivrec'h hag an Templ m'en em gave en e greiz. E ziougan en

devo ur sevenidigezh souezhus : rak kondaonet e vo ar C'hrist d'ar maro evit bezañ diskleriet e geñverelezh gant an Templ, evit bezañ suraet ar gomz kevrinus-mañ "Distrujit an Templ-mañ, hag en ur ober tri devezh ec'h adsavin anezhañ." Hennezh eo an tamall e voe dalc'het dezhañ en e enep. Ar Farizianed, evit gwir, o devoa muzuliet mat an hed hag al led eus ar gomz-se ; komprenet o devoa a-walc'h e talvezze da lavarout torridigezh an urzhiadur kozh, pa oa aze dirazo an hini oa an Templ nevez. Ar pezh a zo misterius end-eeun eo m'o deus nac'het en anavezout, m'o deus nac'het asantiñ da fin an urzhiadur kozh pa oa rekis ar maro-se evit un adsav nevez : dalc'het o deus, koustet pe gousto, d'an Templ kozh a santent o vrallañ, ha kavet o deus gwell klask diskar an Templ nevez ; met gant se eo ar c'hontrol eus ar pezh a vennent o deus sevenet ; deuet int da vezañ oberourion e savidigezh, rak taolet o deus ar setañs a varo war an urzhiadur kozh, dre zistrujañ e korf Jezuz e-unan holl urzhiadur Lezenn Moizez, dre m'en devoa Jezuz en em c'hraet unan gantañ, ha permetet o deus gant se diazezidigezh an urzhidigezh nevez e Jezuz dasorc'het.

An drama-se a zo ivez hini ar bed pagan, heritour an urzhiadur kosmek. Ha goude ma vije dija en em ziskouezet ar grouadelezh nevez ha ma vije didalvoudekaet an hini gozh, eñ ivez en deus dalc'het hag a zalc'h d'en em stagañ gant dizesper ouzh an Templ kosmek, ha da virout anezhañ, evitañ da vezañ distremenet : chom a ra gant kehelerezh an heol gwelus, tra maz eo teñvalaet e sked gant darvoud ar C'halvar. Menel a ra suj da gelc'hiadoù an Amzer muzuliet gant an astroù ha d'o redie-

zhoù hep kompren ez eo bet torret chadennoù an danvez hag ez eo aet an den er-maez eus kelc'hiad arganedigezhioù douarel evit antren ur wech da viken er vuhez peurbadel. Gant se, amañ ivez, evel evit Israël, e teu ar pezh a zo rakskeudenn ha raktres, da vezañ maro ha breinadurezh. N'eo ket ken dinammded ar bed kosmek, "an heol kentañ war ar mintin kentañ", (Péguy:Eve) hogen e diabarzh an Templ diamzeret ez eo miridigezh ul liderezh aet hiviziken da zidalvoud. Evel-se e pec'has an Impalaer Julianus a-enep an Istor, pa zilezas an Doue en devoa e sklerijennet en deiz e vadeziant, evit distreiñ da Zoue pagan ar Goursav-heol ha klask adsevel ur baganiezh distremenet.

Mister an Istor a gendalc'h dindan hon daoulagad. Reiñ a ra dimp an tu da gompren an darempredoù dramaek a laka d'en em enebañ ha, war un dro, d'en em dostaat, an tri bed: an hini pagan, an hini yuzev hag an hini kristen, int o tiskouez dimp an tri marevezh bras. Hoallet e vez en un doare kuzh ar bed pagan hag ar bed yuzev gant ar bed kristen evel gant o feursevenidigezh, ha war un dro en em savont a-enep dezhañ rak ne c'hell c'hoarvezout o feursevenidigezh nemet gant an dilez eus o bezoud o-unan, gant an dinac'h eus o emvoud (5) e-unan. Setu perak e wel enno ar bed kristen a-wechoù diaraogerion, ma c'hell kemer o holl binvidigezhioù en e zalc'h da vezañ e dra : ar Bibl ha Vergilius, Jeruzalem ha Roma ; ha gwechoù all, e wel enno enebourion, pa nac'hont e zegemer, pa glaskont evel ar Yuzevion gwechall e deurel er-maez eus an Templ a daolioù-mein. Ha kement-se a c'hoarvez dre maz eo ret, hervez m'en deus Pascal en gwelet don, ma vo anataet ar gendalc'hegezh a

zo etre ar rakpatrom hag ar gwirvoud met ivez o disheñvelder ; kement-se a dalv dreist-holl evit ar bed yuzev, en abeg d'ar c'heñveriadur ispisial a zo etrezañ hag ar Gristeniezh ; met kemend-all a dle bezañ lavaret ivez eus an holl bobloù hag impalaeriezhoù. Trajedienn Jeruzalem a gendalc'h a-dreuz d'an Istor a zo crisis, da lavarout eo, reuz ha dezvarn, en ur vezañ ivez war un dro peursevenidigezh ha leunder.

oooooooooooooooooooooooooooo

VI

TEMPL KEVRINEL
AN ENE

"Ar C'hrist, Mab Doue, en deus savet evit Doue, evitañ e-unan hag evidomp un arc'h hag un tabernakl peurbadel ; an tabernakl-se eo eñ e-unan, pe an Iliz santel, evel maz eo c'hoazh pep den oc'h ober ar mad, ar C'hrist o vezañ ar Priñs hag ar Penn anezhañ... Pa fell d'un den sentiñ ouzh Doue a galon ez eo dieubet ha diskarget diouzh pep pec'hed dre wad hon Aotrou Jezuz Krist. En em stagañ, en em unaniñ a ra ouzh Doue ha Doue outañ. Ha dont a ra da vezañ eñ e-unan an Arc'h hag an Tabernakl, en doare ma fell da Zoue bezañ o chom ennañ, - n'eo ket en un doare skeudennel, met e gwirionez. Rak un dra dremenet eo ar skeudenn, met diskuliet eo ar wirionez evit ar re a venn en em dreiñ war-zu enni."

E-giz-se e komz Ruysbroeck e penn-kentañ e levr war an Tabernakl Speredel. An Templ gwirion hag a zo ar Verb en e zenelezh, a zo dezhañ tri doare : war un dro ez eo Jezuz, den-Doue, ez eo an Iliz, ez eo pep ene. Pep ene a zo templ gwirion Doue, e oa Templ Moizez ar skeudenn anezhañ ; ha Ruysbroeck, goude Gregorios Nisa, a-raok santez Tereza Jezuz, a

sav an daolenn eus splannderioù speredel an Tabernakl diabarzh-se.

Ar C'hrist e-unan en devoa kemennet ar chomadur-se eus an Tri Ferson en eneoù ar re a vefe unanet outañ : "Maz eus unan bennak hag am c'har, e viro va c'homzoù, ha va zad a garo anezhañ, hag e teuimp davetañ, hag e vimp o chom gantañ." (Yann,14,23). Un dra anat eo d'ar sent sevenidigezh ar bromesa-se ; santez Tereza a skrive kement-mañ diwar he henn hec'h-unan : "Honvezh a wel sklaer emañ an Tri Ferson e diabarzh hec'h ene, el lec'h an diabarzhelañ evel en un islonk don-kenañ. Ne c'hellfe ket lavarout petra eo an islonk-se don-kenañ. Met hennezh eo al lec'h ma sant enni hec'h-unan emañ Doue ganti." (Santez Tereza : Ar c'hastell diabarzh. Seizhvet chomadur.) Evel-se ez eo pep ene kristen un Templ dediet da Zoue na dle ket bezañ disakret : "Hag-eñ n'ouzoc'h ket ez oc'h Templ Doue hag emañ ar Spered Santel o chom ennoc'h ? Ma teu unan bennak da zistrujañ Templ Doue, Doue en distrujo, rak santel eo Templ Doue, ha sed ar pezh ez oc'h-c'hwi hoc'h-unan... Hag-eñ n'ouzoc'h ket ez eo ho korf Templ ar Spered Santel hag a zo ennoc'h, hoc'h eus resevet digant Doue, ha n'oc'h ket ken deoc'h hoc'h-unan... Ni a zo Templ an Doue bev, hervez ar pezh en deus lavaret Doue e-unan : chom a rin en o c'hreiz, ha kerzhout a rin ganto; o Doue e vin hag int a va va fobl." (I Kor.,3,16;II Kor.,6,16.)

An Templ diabarzh-se a oa rakskeudennet gant Tabernakl Moizez. Evel gant hemañ ez eus ennañ teir lodenn. Bez' ez eus da gentañ ar rakleur a zo arouez an den troet etrezek an diavaez : "Rakleur an Tabernakl eo ar vuhez renet hervez an emreizh gant an den troet

war-zu an diavaez ha kement a zo dioutañ... En-dro dezhi ez eus ur rideoz a lin fin gwia-det ; ha gant se e komprenere purentez ar vuhezegezh." (Ruysbroeck : An Tabernakl Speredel.) Evel-se ar bevañ diouzh ar vertuzioù a zo evel diavaez an Tabernakl speredel ; ez eo ar pezh en em ziskouez ar muiañ da sell ar re all.

E-barzh al leur e oa aoter an olokostoù : "Setu skeudenn ar vuhez-santout o tizhout unander ha diabarzhelezh dre bellaat diouzh prederioù an douar." (Ruysbroeck : An Tabernakl speredel ; digoradur.)

Ha goude-se ez eus un eil klozadur muioc'h a-ziabarzh, a zo al Lec'h Santel : "Ar vuhez vertuzus n'eo ket ken war ar bazenn-se embregañ ar vertuzioù, met pleustriñ war ar penn-vertuzioù teologel : ar feiz, an esper, ar garantez, dre ma tremenomp ganto en un urzhiadur uheloc'h, pa roont dimp bezañ unanet war-eeun ouzh Doue." (Ruysbroeck : an Tabernakl Speredel ; digoradur.)

Evel-se, mui-ouzh-mui ez eer d'an diabarzh - ha seul maz antre an ene ennañ e-unan er stumm-se, seul vui e tosta ouzh Doue. "Rak en den diabarzh ez eo emañ ar Wirionez o chom." An doare gwirion da gaout Doue a zo evel-se en em zieubiñ diouzh an den diavaezel, diouzh ar vuhez estren-se m'en em ziberc'hennomp enni, evit adkavout hor boud gwirion, skeudenn Doue, a zo kreizenn an ene. An antren-se mui-ouzh-mui ennomp hon-unan a zo lusk ar vuhez speredel ; an ene neuze en em denn eus bed touellus ar seblantoù diavaez, evit adkavout en e greiz don e wirionded. An distro-se ennañ e-unan ne zisparti ket anezhañ diouzh ar re all ; er c'hontrol : p'emañ ar muiañ

ennañ e-unan eo neuze m'emañ an tostañ dezho ; dre greiz hon eneoù en em unanomp ouzh ar re all.

Dre-se eo dreist-holl Doue a zo adkavet. Rak al lusk-se eus an diavaez d'an diabarzh a zo war un dro un dont e-barzh dre ma tenn ac'hanomp eus ar bed evit en em adkavout ; met war un dro ez eo ur mont er-maez, rak en tu-hont dimp-ni hon unan, er pep diabarzhelañ, hon eus da adkavout Doue a zo bezant ennomp muioc'h egedomp hon-unan : "Ennon emañ, o vezañ maz eo me va-unan muioc'h egedon." Em c'hreiz donañ e laka ac'hanon da zizoleiñ ar vammenn ma tarzh diouti va bezoud.

E penn-kentañ ar vuhez speredel e seblant d'an ene ez eo an dilezel ar bed, an distreiñ d'an-unan, an orezon, oberoù diwar youl hepken, un emgann a-enep hor ponnerded korfel. Met tamm ha tamm e teuomp da gustumiñ, hag ar bonnerded korfel eo ar pezh a zeu da vezañ estren dimp. An ene a adkav e wir natur. Nemet neuze e kej gant skoilhaù all, lorc'hentez hag emc'hloar, ma rank o dinac'hañ. Ha c'hoazh goude-se eo ar skeudennoù hag ar me-noziadoù e tle ar reiz en em buraat diouto, rak ur burentez uheloc'h ez eo kement-se. Erfin eo gwrienn e voud e-unan, an amor sui, karantez an-unan, a dle an ene dilezel. Poaniusañ strivadenn ! Met war an tu-all emañ an diskuizh, mor peoc'hus an evurusted doueel. Warnañ e vo an ene o verdeiñ da viken, oc'h en em guitaat er goursav : hogen n'eo mui poanius ar goursav-se ; ar pezh avat n'hall ket ken bezañ gouzavvet gantañ eo dilezel ar garantez. Ar goursav er-maez ac'hanomp eo ar pezh ez omp stegnet neuze dezhañ : en neñv e vezimp evel diberc'hennet ac'hanomp hon-unan

(6), evit bezañ sachet en Doue gant kement a zo ac'hanomp (arabat taolennañ buhez an neñv evel ur perc'hennadur eus Doue, pa'z eo kentoc'h un diberc'hennadur ac'hanomp hon-unan en un evurusted peurbadel). An disheñvel avat eo ez eo koustus ha poanius dimp war an douar ur seurt emzilez oc'h adressañ hon natur nammet, pa ne vo ket evel-se er Baradoz - pa vimp neuze daskoret d'hor boud gwirion.

Eno 'mañ Santual ar Santualioù, an aditon ('al lec'h kuzh'), ar gambr sekretañ eus ar Santual. Sed aze an deon eus an ene ma komz Tauler dioutañ, ar greizenn, an islonk donañ ma skriv santez Tereza diwar e benn. Ul lec'h ez eo n'hall ket bezañ anavezet gant an ene, un teñvalder n'hall ket e sell antren ennañ. Eno eo, er pep donañ eus santual an ene, emañ an Dreinded o chom, kuzhet da selloù an den. Pe gentoc'h, eno eo emañ dalc'hmat oc'h en em reiñ d'an ene en em zigor dezhi, en ur lakaat an ene-se da antren e diabarzh he buhez-hi, an Tad o reiñ dezhañ e Verb, hag hemañ dre ar Spered o sachañ an ene war-zu an Tad, skrapet maz eo neuze e buhez an Dreinded hag en he lusk peurbadel. Gant se, dre ur goursav a gas anezhañ en tu-hont d'ar bed, en tu-hont dezhañ e-unan, e tizh an ene e voud gwirion dre en em dreuzneuziañ e Doue.

Ar vezañs-se eus Doue e kreiz-don an ene n'eo ket un dra dilusk. Un donedigezh bepred nevez ez eo, ur c'hanedigezh dizehan eus ar Verb gant an Tad. Mister Nedeleg ez eo en hon eneoù : "Dum medium silentium teneret omnia." En noz an deñvalded doueel emañ Doue an Tad o c'henel e Vab, o lavarout e Verb a-holl -viskoazh ; e sioulder e vuhez don e strink e Gomz unel he peurbadel. Evel-se ivez ez eo e sioulder nozvezh Betlehem m'eo bet ganet ar

Verb d'e vezañs douarel hag istorel ; evel maz eo e teñvalder an ene dianavezus d'an ene e-unan, er c'hreiz don-se e-lec'h n'eus ken na meizadurioù na skeudennoù na faltazi,er sioulder donañ lec'h ma tav galloudegezhioù an ene, eno 'mañ an nor digor war Zoue, war an Doue ma tenn dioutañ e orin, e sioulder an noz-se ez eo emañ an Tad o c'henel e Verb en ene.

"An den diabarzhel, nobl ha bras, en deus e orin e donder pur-meurbet an doueelezh ; stummet maz eo diouzh skeudenn Doue, an noplañ, ar speredelañ eus ar boudoù,ez eo galvet da zistreiñ en donder-se maz eo deuet dioutañ, evit dont da gaout perzh e pep mad.Ma c'hellfe unan bennak, en e ziabarzh e-unan,kavout, anavout Doue hag arvestiñ anezhañ, evel m'emañ aze, kuzh ha misterius e strad an ene, hennezh, hep mar na marteze, a vefe evurus. Moarvat emañ dalc'hmat an den o tistreiñ e sell diabarzh diouzh Doue evit e deurel war an diavaez, evit e lakaat da ziankañ a bep tu war ar c'hrouadurioù ; met koulskoude, adsa- chet, azgalvet e vez gant Doue bezant en e greiz-don, e diabarzh kuzh an ene." (Tauler).

O Gwerc'hez Vari, adstrollit galloudegezhioù va ene, advodit anezho e kreizenn va ene ; e sioulder an holl c'hoantoù, e noz an holl skeudennoù, grit ma tiskenno va ene ennañ e-unan betek an deon misterius-se e-lec'h ma teu ar Verb da vezañ ganet ennon. Grit d'am ene en em deurel holl er Verb, evit antren e buhez an Dreinded, evit en em goll en e bezh enni, evit en em lezel da vezañ adstummet holl, evit bezañ treuzfurmet ennoc'h, o Verb Doue. O Mister ar Verb bezant a-dal an deroù, a zo bet graet pep tra drezañ, hag a zeu hizio,ur wech

ouzhpenn em c'halon : "Et Verbum caro factus est," o reiñ dimp ar galloud da vezañ bugel da Zoue, da gaout perzh en e Vabelezh: "Dedit eis potestatem filios Dei fieri." Va sachit er c'hreiz-se eus va ene ; va lakit da vezañ bezant d'ar c'hinivelezh-se : "Aze 'mañ an neñv a-bezh bodet evel e Betlehem, Mari stouet gant an Aeleez, Yozef, an holl sent, an holl oc'h adoriñ an hini a ziskenn evidomp, ennomp, en hon touez.

.....

VII

TEMPL AN NENV

En Templ Jeruzalem e oa dispartiet Santual ar Santualioù diouzh peurrest an Templ gant ur ouel gwiadet e pevar liw, na veze den ebet o vont en tu-all dezhi, nemet ur wech ar bloaz, ar Beleg-meur; hag o vezañ ma veze adc'hraet ar jestr-se e oa anat hor boa aze un akt arouezel, ur strivadenn na zeue ket da bennmat : "Gant se e tiskouez ar Spered Santel ne oa ket digor c'hoazh hent santual an Neñv." (Hebr.9,8). Pep tra amañ a oa skeudenn ha sin : an Templ, ar ouel, ar Beleg-meur, an antre. Hag ar pezh a oa skeudennet amañ, ar gwirvoud sinadekaet gant kement-se a oa peursevenidigezh oberenn hor silvidigezh gant ar C'hrist oc'h antren ur wech evit biken, eñ Beleg-meur ar grouadelezh, e Templ an Neñv, da zeiz e Bignidigezh. "Ar C'hrist o vezañ deuet evel beleg-meur ar madoù da zont, goude tremen dre un tabernakl uheloc'h ha parfetoc'h - an hini n'eo ket diwar labour an dorn, da lavarout eo, an hini n'eo ket eus ar bed-mañ, a zo antreet, ur wech evit mat, dre e wad e-unan ha n'eo dre wad bouc'hed ha leueoù, e-barzh ar Santual, goude bezañ gonezet evidomp un daspren peurbadel." (Hebr.9,11-12).

An holl c'herioù a zo amañ karget a vister, pa glaskont taolennañ akt brasañ an istor, an akt unel ned eo akt an Oferenn nemet ar

berc'hennidigezh sakramantel anezhañ : "Jube haec perferri per manus sancti Angeli tui in sublime altare tuum." ("Grit ma vo douget hor profadenn dre zaouarn hoc'h Ael santel war aoter ho kloar, e lein an neñvoù.") Rak ar Bignidigezh a zo peursevenidigezh mister hor silvidigezh. Ar C'hrist eo ar Beleg-meur, da lavarout eo, kannad an Denelezh a-bezh ; gantañ ha drezañ eo an natur-den en he fezh a zo antreet evit biken e Templ an Neñvoù. Gantañ ec'h antre an Den (an Denelezh)e Templ an neñv, da lavarout eo, e splannder ar c'hrouadurioù speredel a zo an Templ, ar C'hloar, e-lec'h m'emañ o chom an Dreinded Santel. "Unander parfet Speredoù an Neñv, kenstrollet hep disrann ebet, a zo chomadur dibar an Doueelezh." (Sant Bernez : De verbis Ecclesiae. III, war-dro ar fin).

Gregorios Nisa a blije dezhañ hañvalout alies ar grouadelezh neñvel ha klok-se ouzh ur gensonadeg, ur c'horad gant kan ha koroll o lidañ ur gouel peurbadel en-dro d'ar mestr-korad: "Un amzer a zo bet ma oa unvan korad ar c'hrouadurioù speredel, an holl o sellout war-zu ar mestr-kaner unel en ur zisplegañ hesonerezh o dañsadeoù hervez ar mentadur merket gantañ. Met ar pec'hed a zeuas hag a zisleberas ar c'hensonerezh awenet-se. Strewiñ a reas ar fazi dindan treid hon tud kentañ a zañse a-gevret gant an Aelez galloudus." (Sant Gregorios Nisa : In Psalm. P.G. XLIV, 508 B, 509 A). Ar re-mañ, abaoe kement-se, a c'hortoze, o veilhal ouzh dorjoù ar Baradoz, distro ar c'hantvet dañvadez, an Denelezh, o c'hoar. Ar Bignidigezh eo distro an dañvadez kollet, douget war diwskoaz ar Mesaer, e-pad m'emañ an Aelez o saludiñ gant joa ar C'hrist, trec'her war ar maro, o lakaat an Denelezh da antren

en-dro er c'horad d'e glokaat a-nevez.

An antreidigezh-se eus an Denelezh e templ an Neñv a zo un dra gonezet ur wech da viken. N'eo ket ken ar beleg-meur hepken a c'hell antren ur wech bep bloaz en ur Santual-ar-Santualioù arouezel, ar pezh - dre zerc'hel da vezañ adc'hraet - a verke, evel m'en lavar sant Paol gant donder speredel, ne oa aze nemet ur skeudenn ha n'eo ket un dra kaset da benn ; bremañ en neñv eo an Denelezh en he fezh a ra eno he chomadur da beurbadout. Sed aze c'hoazh ul lavarenn veur ; talvezout a ra da verkañ ez eo gonezet ar silvidigezh hep distro, ne c'hell mui bezañ laket en arvar na diskaret gant un eil pec'hed. Ha penaos e c'hellfe bezañ en ur stumm all peogwir ez eo e Personelezh Mab-Doue hec'h-unan ez eo unanet an Denelezh ouzh an Doueelezh. An diogeladur-se a skub kuit pep touellwel eus un distro peurbadel, eus ur c'helc'hiad hep fin a silvidigezhioù hag a adkouezhadurioù. Reiñ a ra d'an esperañs kristen startijenn Komz Doue ha n'eus dezhi morse un distro war-dreñv. Setu kaset da benn mennad Doue ; setu tizhet gant ar bed e bal hag e finvez ; ur ster en deus. Emaomp gant fin an amzerioù : "Evel-se emañ gant ar gomz a zeu eus va genoù : ne zistro ket davedon hep bezañ graet he labour, hep bezañ sevenet ar pezh am eus mennet." (Izaia, 10).

Erfin ez eo "gant e wad e-unan" ec'h antre ar C'hrist e Santual an Neñvoù. Gonezet eo ar silvidigezh, ha da viken, dre lidlzh an Oan. Ha setu perak emañ lidlzh an Oan a genastenn gant an holl amzerioù. Leuniañ a ra ar Sizhun Santel (7). En hevelep doare e taolenn dimp an Diskuliadur antre an Oan e Templ an

neñv : "Neuze e welis e-kreiz an tron hag ar pevar loen, hag e-kreiz ar Gozhidi, un Oan en e sav, evel lazhet." (Disk.5,6). Dramaël-kenañ eo an daolenn hon eus aze : an Aelez o c'hortoz Leon Youda, ur roue trec'hour, ha setu ez eo un oan lazhet an hini en em ziskouez. Gregorios Nisa en deus diskrivet ar souezhadenn-se : "Aelez an douar a ya d'e ambroug hag a c'houlenn digant dorjoù an neñv en em zigeriñ evitañ, ma vo klodusaet a-nevez ganto. Met n'eo ket anavezet ganto, gwisket maz eo gant sae dister hon natur, ruziet e zilhad e gwas-kerell pec'hedoù an den." (In Ascensionem.P.G. XLVI,693C). Sed aze un dra nevez aet e-barzh koriou an neñvoù : sae ruz ar re zasprenet e-mesk sae wenn ar re ziwallet. Un dra 'zo a c'hello bepred an Aelez aviañ digant an dud, ar perzh-se kemeret e Pasion ar C'hrist.E-kreiz korad an Aelez, setu antreet en Templ peurbadel, ar verzherion spluiet e gwad an Oan, ar gwad-se hag e wele santez Katell a Siena an Iliz a-bezh soubet ennañ.

Hiviziken eo an neñv a zo lec'h-annez an Denezh: eno emañ dija o chom dre ar C'hrist - Penn ar C'horf Kevrinus - ha dre Ilizad ar re evurus. Eno e vez lidet hiviziken al Liturgiezh n'eus nemeti o talvezout da vat, - n'eo ket ken e-kichen ar mammenoù-dour nag en un Templ bet savet gant mein. Al Liturgiezh-se eo an hini taolennet gant sant Yann en Diskuliadur : "Hag e stoujont dirak an Oan, ganto pep a delenn ha kopoù aour leun a borfumoù a zo pedenoù ar Sent." (Disk.5,9.) Liturgiezh neñvel a gemeromp perzh enni war an douar gant an Oferenn a zo kinnigadenn Sakrifis an Neñv. An Oferenn a zo bezañs wirion an darvoud lid-eñvoret ; dre un uhelberzh dibar - hag aze

e mañ ar mister, emañ ar sakrifis eñvoret en diavaez eus an amzer. met war un dro,dre lid ar skaramant, emañ an douar en ec'honder hag en amzer, ha gant se eta, dre tu ar rit hag al lid, eo disheñvel ivez ar sakrifis a ginnigomp amañ diouzh sakrifis an neñv,daoust maz eo an hevelep hini e donder ar boud. Evel-se eo an hevelep gwirvoud, an hini a veze skeudennet gant antreadenn an Arc'hveleg e Santual ar Santualioù, a zo deuet da wir gant ar C'hrist oc'h antren e-barzh an neñv da zeiz e Bignidigezh, hag a zo perc'hennet war an douar en un doare diwelus dre sakramant an aoter, gwirvoud hag a zo antreadenn an naturden e Templ an Neñvoù. E barr an neñv emañ an Oferenn, hag en abeg da se emañ an Aelez aze en Oferenn : leun eo gant dasson o c'hanennoù, a-dal "gloria" Nedeleg betek "Sanktus" ar Mister kuzh.

An antreadenn-se eus an Denezh e Templ an Neñv, eviti da vezañ gonezet evit an holl ha da vezañ un dra wirion evit an Denezh en he fezh, a dle koulskoude bezañ gonezet gant pep unan. Un dra sevenet ha gwirvoudel ez eo moarvat a-benn bremañ - ha sed aze an diforc'h don e-keñver ar pezh a oa dindan Moizez, - met un dra dindan ur ouel ez eo c'hoazh : "Ar C'hrist a zo Beleg-meur ar madoù da zont." (Hebr.9,11).An holl ekonomiezh a-vremañ, eviti da vezañ gwirvoudel e-keñver skeudenoù Lezenn Moizez, a zo c'hoazh skeudenn, hi hec'h-unan, e-keñver he feursevendigezh. Profediezh ez eo, gortozidigezh. Ar vuhez leun ha gwirion, ar chomadur, a zo e-lec'h-all. N'eus amañ nemet teltennoù da c'hortoz, a dleomp bezañ prest d'o rollañ kuit. "Emaomp o

chom pell diouzh an Aotrou keit ha m'emaomp o lojañ er c'horf-mañ." (II KOR.5,6). Ar mister en e vezañs hollek ha peurbadel a sach ar c'hristen en un doare didrec'hus gant e nerzh diabarzh etrezek ar vezañs leun eus Doue : "Pondus meus, amor meus." ('Va fouez eo va c'harantez'). En e Ziskuliadur sant Yann a ziskouez dimp an Denezh evel ul lidambroug-deg o kerzhout war-zu Templ an Neñvoù : "En o save oant dirak an Tron, a-dal d'an Oan, gwisket gant saeoù gwenn ha barroù-palmez en o dorn" (Disk.7,9).

Evel-se ez eo ar vuhez kristen ur c'hortozidigezh. Gouzout a ra ar c'hristen ez eo graet evit madoù uheloc'h : santout a ra en un doare lemm pegen reuzeudik eo e stad a-vremañ. C'hoantaat a ra bezañ disammet eus pouez e vuhez-korf gant he sklavelezh : "C'hoant am eus da vont kuit ac'hann da gaout ar C'hrist" (Fili.1,23). Tra ma klask an den korf en em stagañ ouzh e blijadurioù, emañ ar c'hristen o vevañ war live ar boud gwirion, dizalc'h ha dieub, en ur dennañ implij eus an amzer, keit ha maz eo roet dezhañ evit oberiañ gant karantez e-keñver an holl. Obererezh diwelus da sell an dud. Ur vuhez kuzh eo ar vuhez kristen. Met pa vo bet paket kuit ar bed-mañ evel un deltenn, neuze en em ziskouezo ar gwirvoud chomet kuzh.

Kement-se ne dalv ket da lavarout e vefe ar c'hristen dizamant ha diseblant e-keñver traoù ar bed, hogen ne wel enno nemet ur penn kentañ, nemet ar c'hovel ma vez stummet enni an eneoù divarvel. An labour nemetañ en divije talvoudegezh eo lakaat buhez ar C'hrist da greskiñ ennañ hag er re all. Ar bed a zo evitañ "ur wikefre d'ober doueed." Er bed-mañ

end-eeun e vez stummet an doueed-se. Gant se e kemer ar c'hristen perzh gant gred e stourmoù an douar, daoust n'eo ket evito o-unan en devefe da strivañ, evel pa c'hellfe krediñ en ur geoded denel parfet ha difistur er bed-mañ rak gouzout a ra en deus diskleriet ar C'hrist "va rouantelezh n'eo ket eus ar bed-mañ," met dre 'n abeg maz eo stag silvidigezh eneoù e-leizh ouzh standur ar vuhez douarel.

Kement-mañ ne dalv ket kennebeud-all da lavarout e vefe didalvoud evitañ ar boudoù douarel, e teufe ar c'hoant-bevañ da zisteraat ennañ e-pad ma kreskfe e zoug da dec'hout eus ar bed fall-mañ gant ur c'hoant klañvidik eus ar maro. An emzalc'h speredel-se hag a zo oc'h awenañ ar Meulganoù d'an noz gant Novalis, Nirvana, gant Schopenhauer, Tristan gant Wagner, a zo tra estren dezhañ. Kement-se a zo un distro d'an nannboud ha d'an tohubohou kentañ. Evit ur c'hristen avat, ar maro eo ar beursevenidigezh eus kement en deus bevet en un doare diglok war an douar, an dieubidigezh eus kement a zo chadennoù ar c'horf hag ar stad varvel a-vremañ : "Dre ar maro en em zigoromp da gement en deus hon laket da vevañ e gwirionez war an douar." (Gabriel Marcel : La soif, p.161.)

Se ne dalv ket kennebeud-all da lavarout e vefe evel diverket evit ur c'hristen an harzoù a zo etre ar vuhez hag ar maro, evel m'emañ kont gant Rilke pe Morgan : "An dud vev," eme Rilke, "an holl anezho a ra ar fazi da lakaat un diforc'h re vras etre ar vuhez hag ar maro. An Aelez, int-i, n'ouzont ket hag-eñ e tremenont e-touez ar re vev pe ar re varo." (Rilke : Klemmganoù Duino). Moarvat evit ar c'hristen ez eus kendalc'hegezh etre ar vuhez kristen a grogomp amañ ganti hag he feurseve-

nidigezh er beurbadelezh. Chom a ra koulskoude ez eo evit an ene e dremenvan e akt pennañ, pa zilez gant frankiz e stad a varvelezh evit en em stegnañ ouzh ar vuhez beurbadel. N'eo ket da lavarout e c'hellfe ur seurt akt kemmañ pep tra : met an ene fidel ne c'hell ket neuze dislavarout ar pezh a zo bet e holl vuhez ; dastum a ra d'an eur-se frouezhioù mat e fealded. En em gempenn a-benn an akt meur-se eo ar pezh a zo d'ober penn-dabenn eus ar vuhez-den douarel, evit an antreidigezh en Templ an neñv en tu-hont d'ar ouel a guzh anezhañ c'hoazh d'hor selloù.

Ar vuhez-mañ a zo eta evit ar c'hristen un amzer d'en em stummañ tamm ha tamm diouzh Doue, ur gelennadurezh a dleomp derc'hel dezhi betek eur ar maro, rak buhez an den en he fezh a zo ur prantad-deskiñ. Evel ma lavar Jean Guiton : "Ar vugaleaj a servij d'an den d'en em stummañ d'e vuhez douarel, hag an oad-gour d'en em aozañ e sell e vuhez beurbadel, evit ma kavod d'an den en devo dija damwelet ar pezh a welo neuze." Ret eo na vefemp ket divroet en ur zegouezhout en neñvoù. Ur prantad-deskiñ eo hor buhez : ar pezh a zo d'ober eo kregiñ d'en em stummañ evit ar pezh hor bo da bleustriñ un deiz warnañ. Evel-se e klaskomp gant ar bedenn gagouilhat un dra bennak eus ar pezh a vo "kaozeadenn an neñv" gant Doue hag e Aelez ; ret eo eta dic'hourdañ hor spered ken peg ouzh bed an ec'honder hag an amzer, ha dreistnaturelaat anezhañ tamm ha tamm hervez traoù Doue dre labour donezonoù ar Spered Santel. Evel-se ar garantez a zo an deroù diampart eus ar genunvaniezh leun a genstrollo an holl Sent. Oc'h ober evel-se e krogomp d'en em reiñ d'ar pezh hor bo da viken da embreger. Hor buhez wirion eo an hini

a glask en em rakstummañ. Emañ pep tra gant e benn-kentañ.

An deskoniezh-se n'eo ket hepken hini hor buhez en hec'h unvaniezh gant Doue, met ivez hini hor buhez a gumuniezh gant ar re all. Ne vo ket hor maro an diskuliadur eus hor gloar hon-unan hepken, met ivez an diskuliadur eus hon unander kevrinus ha kuzh c'hoazh. Evel ma chom kuzh hor c'horf a c'hloar dindan spezoù hor c'horf marvus, evel-se dindan diavaezoù an Iliz gwelus eo kuzhet unander an dud er c'horf kevrinus. Diskuliet hag anataet e vo an eil hag egile war un dro. An daou verk bras eus gwastadur natur an den en he stad a-vremañ a zo breinadurezh ar maro ha torridigezh an unander. Gant an divreinusted hag an unander adkavet e vo anataet distro klok an Denelezh d'he statur wirion. Sakramant an Aoter eo an hini a zo war un dro ar sin hag ar benveg-oberiañ eus a gement-se. Eñ a zo ar viatik, bara ar beajour, ar pourvez evit an hent o reiñ kennerzh betek an ti ; prientiñ a ra dimp perzh er vuhez glorius dre hon stagañ ouzh ar C'hrist, an hini antreet dija da viken enni ; aroueziañ a ra unvaniezh ar C'horf kevrinus en ur gregiñ da sevel anezhañ ; evit hor c'horfoù diester, ken douget d'ar magadurezhioù douarel, ez eo dija bara an neñv, an hini a ro dimp un tañva eus Doue, en doare ma koll traoù an douar o blaz en e gichen ha ma vez dihunet ennomp tamm ha tamm hiraezh ar vuhez wirion ouzh hon sachañ etrezek an Tad.

oooooooooooooooooooooooooooo

NOTENNOU

(1) Sinadekaad, implijet amañ diwar ar gerioù 'sin', 'sinad' (= tra oc'h ober sin, intersigne) a glask treiñ ar gerioù significare, signifier, da lavarout eo bezañ ur sin o kas d'un dra all, o c'hervel d'un dra donoc'h, pe pelloc'h. Sinadekaad a zo eta ober sin, bezañ ar sin eus un dra all. Ar ger arouez hag ar gerioù deve-ret dioutañ, anat eo, n'int ket a-walc'h amañ. (Notenn gant an troour).

(2) An 'Epiklezenn' a zo er Bedenn-veur ar c'halvadenn d'ar Spered Santel da ziskenn da sakriñ ar bara hag ar gwin e korf ha gwad ar C'hrist. Ur ger gresianek ez eo : epi a lavar war, ha klêsis a zever eus ar verb kaleô a dalvez 'gervel'. (Notenn gant an troour).

(3) Ar ger gresianek Eon (aiôn) a dalv da lavarout e yezh kozh an Iliz un amzervezh (pe dibad pe peurbadus) ha war un dro ar bed muzuliet gant an amzervezh-se. (Notenn gant troour).

(4) En diavaez eus ar selladurezh profedek a zo hini ar Gristeniezh, an holl veizadurioù all eus an Istor a zegas pe d'an distro peurbadel evel gant Nietzsche, pe d'an araokidigezh dan-vezel hepmuiken, evel gant Marks, pe d'an diboellegezh ha d'an diveizusted, evel gant Spengler. Diwar-benn kement-se e c'heller lenn evezhiadennoù reizh Aron en e Introduction à la philosophie de l'Histoire. Kement-mañ a seblantfe diskouez ez eo menoz modern an Istor - gwelet evel un araokidigezh er perzhioù-mat, ur wellidigezh, - ur menoz a oa dianav a-grenn d'ar bed kozh, unan diwanet eus ar Gristeniezh - ur soñj a natur relijiel drezañ e-unan, met a zo deuet da vezañ goull ha faos pa verker

dezhañ ur pal na vefe nemet douarel. (Notenn gant an oberour.)

(5) Emvoud a dalv da lavaout amañ : "réalité (existence) propre". (Notenn gant an troour).

(6) N'eus ket da gompren kement-mañ evel pa vije steuziet hon emvoud gant gwel Doue tal-ouzh-tal, evel pa vijemp dibersonelaet. (Notenn gant an troour).

(7) Evit Tadoù an Iliz eo ar Sizhun Santel evel un diverradur arouezel eus holl istor ar bed. (Notenn gant an troour).

~~~~~

TAOLENN


- Rakskrid gant an troour,p.7
- I. An Templ-se hag a zo ar Bed,p.13
- II. Templ Moizez,p.21
- III. An Templ hag a zo ar C'hrist,p.27
- IV. An Templ hag a zo an Iliz,p.37
- V. An Iliz evel sin ha peursevenidigezh an holl demploù,p.47
- VI. Templ kevrinel an ene,p.59
- VII. Templ an neñv,p.67



E sigur niverenn 142 IMBOURC'H ha peurgent, pennad Jil Ewan : "An hegaristiezh ha gouezvoud ar C'hrist : ar saviad arnevez" hon eus bet al lizher-mañ digant Maodez Glanndour :

"Kalz an bije da lavarout diwar-benn ar pennad-se gant Jil Ewan : arabat ober stad eus kozh tezennoù protestant adtommet gant teologourion diboeñ war zigarez a Ekumeniezh. Setu dres menozioù a oa bet argaset a-zevri-kaer gant sened-meur Trenta en ano an Aviel hag an hengoun. Netra nevez ! An "transsubstantiatio" a zo, eveljust, un afer a yezh, ha ret eo kompren petra a lavar ; n'eo ket stag tamm ebet ouzh soñj ar substañs e prederouriezh sant Tomaz (Aristoteles). Talvezout a ra da verkañ ez eus ur gemmadenn diabarzhel a zo diouti hec'h-unan, ur gemmadenn a zo war ur bazenn voundoniel don. Lavarenn Trenta a fell dezhi dizarbenn kement tezem a rae eus mister an Eukaristiezh un daveadur hepken d'ar C'hrist, pe un arouez (ur sin) anezhañ, pe c'hoazh a sellfe ouzh ar spezoù evel ouzh un endalc'her, evel un dra bennak en ur voest (sed aze menoz Luther).

.....  
 Meuleudi avat evit pennad kollo : mat-tre yezh ha soñj.



Moulet gant ar gelaouenn

Ar Rener:Y.Ollivier

CPAPP : 50 015

